



© Gwano

Brastres an departamant evit yezhoù Breizh 2021 - 2026

Renerezh
ar Sevenadur hag ar
Glad Sevenadurel

cotesdarmor.fr



Aodoù-an-Arvor
an Departamant



Pennad-stur

Degemer mat en Aodoù-an-Arvor

Pinvidigezhioù a-leizh ha hep o far zo en hon departamant a-fet yezhoù. Bezañ zo war-dro 50 000 a vrezhonegerien ha kemend-all a c'hallaouegerien en Aodoù-an-Arvor a sikour da vat lakaat yezhoù Breizh da chom bev ennañ.

Ur glad dizanvezel dreistordinal eo al liesseurtes yezhoù-se, gantañ e weler pegen lies eo ar sevenadur en hon bro. Rak ar brezhoneg hag ar gallaoueg zo ur binvidigezh hag un nor da zigoriñ war-zu un ijin, un istor ha gizioù boutin dimp. Ul lodenn eus hon sevenadur pobl int ha gant se e tegasont liammoù etre an dud en hon departamant. Aesaet e vez gante ar genskoazell etre an dud hag an darempredoù etre ar remziadoù.

Daoust m'eo talvoudus-bras ar brezhoneg hag ar gallaoueg, emaint en dañjer hidiv an deiz. Hervez an UNESCO emañ an div yezh-se e-mesk ar yezhoù « en arvar bras ». Re wir eo, ha pa vefe kalz a dud o komz brezhoneg pe gallaoueg c'hoazh, ec'h a an niver anezhe war zigreskiñ. Ha gwashañ pezh zo, mont a ra ar vrezhonegerien hag ar c'hallaouegerien war goshaat founnusoc'h-founnus. Padal eo ret d'ar yezhoù bezañ kaozeet gant an holl remziadoù tud evit chom bev en ur vro bennaket.

Daoust dimp da welet pegen nec'hus eo an traoù e welomp peadra da gaout fiziañs ivez. Tomm eo tud Aodoù-an-Arvor ouzh o yezhoù. Diwar ar « goull yezhoù »-se e teu oberoù a-leizh el lec'h-mañ-lec'h, gant kevredigezhioù, evit kas yezhoù Breizh war-raok. Gwelet e vez ivez e kresk niver ar skolidi en hentadoù divyezhek en hon departamant : en adkrog-skol e 2020 e oa ouzhpenn 2500 a skolidi enne en Aodoù-an-Arvor.



Evit sikour ar « goull yezhoù »-se e oa bet aprouet, a-unvouezh, Brastres an Departamant evit yezhoù Breizh e miz Mae 2021. Savet eo bet gras da labour ar muianiver a oa a-raok ha solutaet e vo ganimp, da gentañ-penn war-fet an arc'hant a vo lakaet, abalamour da gas an traoù da bennvat.

Evel prezidant ar C'huzul-departamant e fell din lakaat ar brezhoneg hag ar gallaoueg da vevañ e diabarzh aozadur an departamant. Talvoudus-kaer eo kement-se evidon. Se zo kaoz em eus goullet e vefe embannet pennad-stur hon magazin, diwar vremañ, e galleg, e brezhoneg hag e gallaoueg. Peogwir e rank ar yezhoù bezañ implijet war ar pemdez evit chom bev, eo dleet d'ar C'huzul-departamant diskouez ar skouer vat. 🌱

CHRISTIAN COAIL

Prezidant departamant
Aodoù-an-Arvor

Raklavar

Liammet eo pep yezh a-dost ouzh ur sevenadur, n'eus ket eus an eil paneve egile. Ezhomm zo eus ar yezhoù abalamour d'ar sevenadur da dremen eus an eil remziad d'egile, hag ouzhpenn-se ec'h int o-unan ur glad sevenadurel dizanvezet da vezañ gwarezet. Frouezh hon istor, frouezh hon mod da welet ar bed int, ha gante e c'hallomp degas fromoù ha gouiziegezhioù an eil d'egile.

Chañs hon eus en Aodoù-an-Arvor pa zo amañ war-dro 100 000 a dud hag a gomz unan eus div yezh Breizh, ar brezhoneg hag ar gallaoueg. Diwar ar binvidigezh-se a-fet yezhoù e vez kalz a lañs gant ar c'hevredigezhioù, evel na vez ket gwelet stank. Graet e vez traoù a-leizh, pe e vefe evit treuzkas ha deskiñ yezhoù Breizh, brudañ anezhe pe lakaat anezhe e-barzh oberoù sevenadurel hag arzel. Panevete n'hall ket ar brezhoneg hag ar gallaoueg bevañ en hon departamant ha sikour a reont merc'hed ha paotred Aodoù-an-Arvor da vezañ en o bleud.

Evit harpañ al labour dreist graet gant bed ar c'hevredigezhioù e oa bet votet Brastres an departamant evit yezhoù Breizh gant ar C'huzul-departamant e miz Mae 2021. Er raklavar-mañ e fell din rentañ enor da skipailhoù an Departamant evit o labour, hag ivez da'm c'henseurt Thierry Simelière, a oa besprezidant karget eus ar sevenadur hag ar glad.



Div lodenn ac'h a d'ober ar brastres-mañ : an eil evit sikour deskiñ ar yezhoù hag eben evit lakaat ar yezhoù da vevañ en departamant. Fellout a ra d'ar C'huzul-departamant kreñvaat ar sikour roet gantañ evit deskiñ brezhoneg ha gallaoueg. An deskamant-se a sell ouzh ar vugale, evel-just, hag ivez ouzh an dud vras gant ar stummadurioù dibaouez. Da-heul an ahel pennañ-mañ e teu ur strategiezh evit lakaat yezhoù Breizh war wel ha broudañ an dud d'ober gante el lec'hioù foran (panelloù teiryezh, harpañ ar c'hevredigezhioù a labour evit brudañ ar brezhoneg hag ar gallaoueg ha kement zo), hag ur steuñv evit aesaat d'an ensavadurioù publik ober gante.

Ar brezhoneg hag ar gallaoueg eo glad an holl, se zo kaoz e vefont e-kreiz politikerezhioù sevenadurel ar C'huzul-departamant.

PATRICE KERVAN

Besprezidant dileuriet evit ar sevenadur ha sevenadurioù Breizh

Taolenn

DIGORADUR	p. 6
1. Ul liesseurted yezhoù en arvar	p. 6
2. Ar framm gwirel etrebroadel ha brudañ al liesseurted sevenadurel	p. 7
3. Ar framm lezennadurel e Frañs	p. 8
LODENN GENTAÑ	
STAD AN TRAOÙ EVIT AR BREZHONEG HAG AR GALLAOUEG EN AODOÙ-AN-ARVOR	p. 10
Digoradur	p. 10
1. An traoù pennañ lakaet war wel gant an enklask sokioyezhoniel e 2018	p. 11
2. Stad ar brezhoneg en Aodoù-an-Arvor	p. 12
3. Stad ar gallaoueg en Aodoù-an-Arvor	p. 12
4. Ar c'helenn hag ar stummañ evit ar re vras	p. 13
4.1. Ar c'helenn divyezhek galleg-brezhoneg	p. 13
4.2. An tañva hag ar c'helenn da zibab	p. 15
4.3. Deskadurezh uhel	p. 17
4.4. Ar c'hentelioù hag ar stummañ evit an dud vras	p. 18
5. Oberoù ar strollegezhioù lec'hel evit al liesseurted yezhoù	p. 19
5.1. Ar garta « Ya d'ar brezhoneg »	p. 19
5.2. Ar garta « Du Galo, dam Yan, dam Vèr »	p. 20
6. Oberoù ar c'hevredigezhioù	p. 21
6.1. Ar c'hevredigezhioù a labour evit ar brezhoneg	p. 21
6.2. Ar c'hevredigezhioù a labour evit ar gallaoueg	p. 22

EIL LODENN :

AR PROGRAMM OBEROU EVIT AR BREZHONEG HAG AR GALLAOUEG (2021 - 2026)	p. 24
Digoradur	p. 24
Ur brastres war emdreiñ bepred hag a roio kalz a blas d'ar c'hendivizoù ha d'ar skiant-vat	p. 25
Ul labour sikouret gant ur bodad evezhiañ ha priziañ	p. 25
1. Ahel 1 : Treuzkas ar yezh	p. 26
1.1. Kelenn ha stummañ kentañ	p. 26
1.2. Ar stummañ dibaouez hag ar stummañ evit an dud vras	p. 27
1.3. Kenskoazelloù	p. 28
2. Ahel 2 : Bevañ ar yezh	p. 30
2.1. Luskañ sevenadurel er broioù, memor ha buhez ar c'hevredigezhioù	p. 31
2.2. Kehentiñ	p. 35

I. Digoradur

« Un teñzor eo ar yezhoù hag ouzhpenn gerioù a vez skignet gante.

Estroc'h evit komz ha daremprediñ e vezont implijet.

***Diouzh un tu ec'h eont d'ober ul lodenn eus merkoù pennañ
an identelezh, diouzh an tu all ec'h eont da frammañ hor sell war ar bed »¹***

1- UL LIESSEURTED YEZHOUÛ EN ARVAR

Ur merk splann eus liesseurted ar sevenadurioù eo ar yezhoù ha mont a reont d'ober ul lodenn a bouez bras eus glad an denelezh. Unan eus perzhioù penañ an identelezh liessevenadurel int ha panevete n'haller ket kaout un endro sevenadurel pinvidik. Un dalc'h meur eo gwareziñ anezhe rak ouzhpenn hanter-kant vloaz zo ne ra al liesseurted a-fet yezhoù nemet digeskiñ. Komzet e vez ouzhpenn 6 000 yezh er bed hiriv an deiz ha tost an hanter anezhe a vefe tonket da vont da netra ac'hann da fin ar c'hantved-mañ hervez an UNESCO.

Evel e kalz broioù all emañ al liesseurted yezhoù e stad fall e Frañs. Eus an eil rummad d'egile ec'h a niver an dud a gomz hag a ra gant ar yezhoù-se, a vez graet « rannvro » anezhe, war zigreskiñ. E Breizh eo lakaet ar brezhoneg hag ar gallaoueg da « yezhoù

en arvar bras » gant an UNESCO hervez ur skeul pemp derez warni (bresk, en arvar, en arvar bras, en arvar da vat, aet da get)². Hervez an enklask sokioyezhoniell kaset da benn gant Rannvro Breizh e miz Gouere 2018, 79 % eus ar vrezhonegerien ha 56 % eus ar c'hallaouegerien zo 60 vloaz pe en tu all hiriv an deiz³.

Abalamour m'emañ al lodenn vras eus ar yezhoù
rannvro en arvar ec'h eo splann d'ar strollegezhioù
tiriadel e rankont ober evit gwareziñ ha brudañ al
liesseurted yezhoù. Soñjal a reer eo ret kaout sikour
ar galloudoù publik, muioc'h evit biskoazh, evit
saveteiñ ha reiñ lañs d'ar yezhoù rannvro.



1 SERRES, Michel. Atlas, Paris, Flammarion, 1996, p. 112

2 <http://www.unesco.org/languages-atlas/fr/atlasmap.html>

3 Rannvro Breizh. Yezhoù Breizh. Enklask sokioyezhoniel. TMO Régions, miz Gouere 2018, p. 32-33. Enklask sokioyezhoniel war ar brezhoneg hag ar gallaoueg kaset da benn e miz Gouere 2018 e-touez 8 162 a dud adalek 15 vloaz hag a zo o vevañ en unan eus ar pemp departamant a zo e Breizh istorel.

2- AR FRAMM GWIREL ETREBROADEL HA BRUDAÑ AL LIESSEURTED SEVENADUREL

E meur a skrid etrebroadel sinet hag aprouet gant Frañs eo renket ar pezh a sell ouzh ar yezhoù e-mesk gwirioù pennañ an dud ha staget ar yezhoù ouzh glad yezhel an dud hag ouzh an eztaol sevenadurel. Rak-se e vez atizet ar Stadoù, gant ar framm gwirel etrebroadel, da dalvoudekaat al liesseurted sevenadurel ha da vroudañ gwarez ha treuzkas ar yezhoù rannvro ha bihanniver.

• Disklêriadur hollvedel gwirioù mab-den (1948)

a embann, er mellad 2, « Pep den a c'hall en em harpañ war an holl wirioù hag an holl frankizoù embannet en Disklêriadur-mañ, hep diforc'h ebet e-keñver ar ouenn, al liv, ar reizh, ar yezh, ar relijion, ar soñjoù politikel pe kement soñj a vefe, an orin broadel pe sokial, al leve, ar c'hanedigezh pe kement stad a vefe ».

• Karta ar gwirioù diazez gant Unaniezh Europa (2000)

ec'h eo termenet ganti gwirioù diazez an dud a zo o vevañ en Unaniezh Europa, a embann er mellad 21 pennaenn an nann-diforc'hañ diazezet war ar yezhoù, da skouer, hag er mellad 22 an doujañs evit al liesseurted sevenadurel, relijiel ha yezhel.

• An Disklêriadur hollvedel war al liesseurted sevenadurel (2001)

a dermen ar framm ma vo kemeret an divizoù a sell ouzh al liesseurted yezhoù gant ar gumuniezh etrebroadel. En e steuñv obererezh e c'houlenner gant ar Stadoù ezel eus an UNESCO kemer an diarbennoù a-vod evit saveteiñ glad yezhel an denelezh ; sikour komz, krouiñ ha skignañ er muiañ a yezhoù ma c'haller ; broudañ al liesseurted yezhoù – en ur zoujañ ar yezhoù mamm – en deskadurezh, forzh pe live e vefe, ha broudañ da zeskiñ meur a yezh adalek bloavezhioù kentañ ar vuhez ; reiñ lañs d'al liesseurted yezhoù er bed niverel ha broudañ da zigeriñ d'an holl dud kement titour hag a sell ouzh an dachenn foran.

• Kenemglev an UNESCO evit saveteiñ ar glad sevenadurel dizanvezel (2003)

a anavez roll pennañ al lavar evit eztaol ha treuzkas ar glad bev. Stag eo an holl dachennoù eus ar glad sevenadurel dizanvezel ouzh ar yezhoù evit a sell ouzh ar pleustroù pemdez hag an tremen eus an eil rummad d'egile. Ouzhpenn bezañ ur benveg evit kas ar glad dizanvezel ec'h a ar yezhoù d'ober penn-natur ar glad-se e-unan.


• Kenemglev an UNESCO evit gwareziñ ha broudañ liesseurted an eztaolioù sevenadurel (2005)

a zegas da soñj, er raklavar, ec'h eo al liesseurted yezhoù « un dra diazez e-barzh al liesseurted sevenadurel » ha kadarnaat a ra « roll diazez an deskadurezh evit gwareziñ ha broudañ an eztaolioù sevenadurel ».

• E Disklêriadur Freiburg war ar gwirioù sevenadurel (2007)

e lavarer, er mellad 3, « pep den, koulz e-unan hag a-stroll, en deus droed da choaz e identelezh sevenadurel diouzh liesseurted ar modoù eztaol, ha da welet doujañ an identelezh-se ; stag eo an droed-se ouzh ar frankizoù soñjal, spered, relijion, mennoioù hag eztaol » ha degas a reer da soñj, er mellad 6, da-geñver ar gwir d'an deskadurezh dre vras, en deus pep den « frankiz da reiñ ha da gaout un deskadurezh war ha dre e yezh ha yezhoù all, ha war e sevenadur hag ar sevenadurioù all ».

EN TU ALL D'AN DIFERADURIOÙ LEZENNEL ETREBROADEL EC'H EO DA GENTAÑ-PENN GANT MA TEUY SKIANT D'AN DUD HA GANT OBEROÙ O DILEURIDI, E VO BROUDET AN EZTAOLIOÙ SEVENADUREL LIESSEURT HA SAVETEET GLAD YEZH MAB-DEN. GANT **ATLAS UNESCO AR YEZHOU EN ARVAR ER BED** E C'HALLER LAKAAT AN DUD D'OVER AR C'HAMMEDOÙ KENTAÑ WAR AN TU-SE. UR BENVEG EO EVIT ANAVEZOUT STAD AR YEZHOU EN ARVAR ER BED HA GOUZOUT WAR BESEURT TU E VEZER O VONT DRE VRAS EVIT A SELL OUZH LIESSEURTED AR YEZHOU, HA DIWAR VREMAÑ E C'HALL AR GALLOUDOÙ PUBLIK EN EM HARPAÑ WAR AR BENVEG-SE EVIT REIÑ DA ABEG D'O FOLITIKEREZH YEZH.



3- AR FRAMM LEZENNADUREL E FRAÑS

Aet eo al liesseurted yezhoù war an diskar e Frañs abalamour m'eo bresk an traoù a-fet lezennoù, e-mesk traoù all. Daoust m'he doa sinet Frañs, d'ar 7 a viz Mae 1999, ar Garta europat evit ar yezhoù rannvro pe bihanniver kinniget hag aprouet gant Kuzul Europa e 1992, n'he deus ket peurwiriekaet anezhi betek-henn c'hoazh⁴. Dav eo lavaret eo start d'ar yezhoù rannvro kavout o flas e lezennoù Frañs. Rak hiriv an deiz n'eus lezenn-stern ebet da dermeniñ statud lezennel ar yezhoù-se.

Ar c'hinnig lezenn a sell ouzh gwareziñ ar yezhoù rannvro evel ur glad, ha brudañ anezhe⁵ zo graet evit ober ar pazennoù kentañ war-zu lezennoù evit gwareziñ ar yezhoù rannvro ha reiñ lañs dezhe. E-mesk an teir zachenn ma c'haller ober an traoù-se – glad, kelenn, servijoù publik – e lavarer er c'hinnig lezenn e tle ar glad dizanvezel, ac'h a ar galleg hag

ar yezhoù rannvro d'ober ul lodenn a bouez anezhañ, bezañ gwarezet hag anavezet gant politikerezhioù, evel ma vez graet e kod ar glad evit ar batisoù, an arrebeuri ha kement zo. Setu ma klasker, e mellad 1 ar c'hinnig lezenn, lakaat ar galleg hag ar yezhoù rannvro er memes kod ivez.

Ar pezh a zo bet gouestlet gant Republik Frañs el live etrebroadel, dreist-holl evit a sell ouzh saveteiñ ar glad sevenadurel dizanvezel ha gwareziñ ha broudañ al liesseurted sevenadurel, hag ivez ar soñj nevez war-fet ar gwirioù sevenadurel a laka war wel eo ret gwarantisañ frankiz an dud da eztaol o sevenadur hag o arz, o deus aesaet kempenn diferadurioù lezennadurel ha gwirel d'ar strollegezhioù da dermeniñ politikerezhioù evit miret al liesseurted yezhoù ha da lakaat anezhe e pleustr.

⁴ Graet eo ar Garta europat evit ar yezhoù rannvro pe bihanniver evit gwareziñ ha reiñ lañs d'ar yezhoù rannvro ha da yezhoù ar pobloù bihanniver en Europa. En Unaniezh Europa (UE), en deiz a hiriv, ez eus 24 yezh ofisiel ha war-dro 60 a yezhoù rannvro ha bihanniver. Diaes eo gouzout pet den a gomz ar yezhoù-se met soñjal a reer e vez komzet unan eus ar yezhoù « nann ofisiel » en UE gant etre 40 ha 50 milion diwar ar 512 milion a dud a zo en Europa.

E-kerzh ar c'hendivizoù diwar-benn peurwiriekadur ar garta europat evit ar yezhoù rannvro ha bihanniver e 1999, e oa bet resisaet gant ar C'huzul Bonreizhel diouzh peseurt framm e c'halled brudañ ha reiñ lañs d'ar yezhoù rannvro e Frañs. En diviz en doa kemeret d'ar 15 a viz Even 1999 en doa pouezet war ar soñjoù diazez evit ingalded ar geodedourien dirak al lezennoù, da lavaret eo unelezh pobl Frañs hag ar Republik dirannus, ar pezh ac'h a enep « e vije anavezet gwirioù a-stroll evit ur strollad tud bennak hag a vefe termenet evel ur gumuniezh e-keñver un orin, ur sevenadur, ur yezh pe ur gredenn ».

⁵ <https://www.assemblee-nationale.fr> : kinnig lezenn niv. 3658, kemmet gant ar Sened, evit a sell ouzh gwareziñ ha brudañ ar yezhoù rannvro evel glad, aprouet gant ar Vodadenn Vroadel d'an 8 a viz Ebrel 2021.

- **Er mellad 75-1 e Bonreizh** ar V^{vet} Republik e lavarer, abaoe lezenn vonreizhel an 23 a viz Gouere 2008, « ar yezhoù rannvro zo ul lodenn eus glad Frañs ». Ha pa zegasfe ar mellad disklêriañ-se un anaoudegezh eus ar yezhoù rannvro gant ar Vonreizh, ne zegas gwir dibar ebet ha n'a ket da gempouezañ ar mellad 2 eus ar Vonreizh ma tis-klêrier « Ar galleg eo yezh ar Republik ».
- **Al lezenn heñchañ ha programmiñ niv. 2013-595 eus an 8 a viz Gouere 2013 evit addiazezañ skol ar Republik** a anavez, evit ar wech kentañ e lezennoù Frañs, ar c'helenn divyezhek galleg-yezh rannvro, ha lavaret a reer enni e ranker harpañ ar c'helenn-se ha kelaouiñ ar familhoù war ar modoù deskiñ a zo anezhe. El lezenn ec'h adlavarer, er mellad 40 a cheñch ar mellad L. 312-10 e kod an deskadurezh, « ar yezhoù ha sevenadurioù rannvro zo ul lodenn eus glad Frañs, gant se e vez aesaet kelenn anezhe dreist-holl er rannvroioù lec'h ma vezont implijet » ha « gallout a reer kin-nig ar c'helenn-se a-hed an hentad er skol ». Er stagadenn ez eus merket « evit aesaat d'ar skolidi mont er skolioù ma vez kelennet yezhoù rannvro, e c'hall ar re a zo o chom en ur gumun lec'h na vez ket eus ar c'helenn seurt-se, bezañ enskrivet en ur skol en ur gumun all lec'h ma vez eus ar c'helenn divyezhek gant ma vo plas enni ».
- **E Kod hollek ar strollegezhioù tiriadel (KHST)**, er mellad L1111-4, e lavarer « ar barregezhioù a sell ouzh ar sevenadur, ar sport, an touristerezh, brudañ ar yezhoù rannvro hag an deskadurezh pobl, zo boutin d'ar c'humunioù, d'an departamantoù, d'ar rannvroioù ha d'ar strollegezhioù dibar o statud ».
- **Adkemeret eo bet ar poent-se gant al lezenn NOTRe eus ar 7 a viz Eost 2015** a verk ur bazenn a bouez evit brudañ ar yezhoù rannvro pa anavez ar gwirioù sevenadurel a zo renablet en **Disklêriadur a vez graet Freiburg anezhañ (2007)**, en o mesk ar fed m'eo ret gwarantisañ d'ar pobloù o frankiz da eztaol o sevenadur hag o arzoù. Rak gant al lezenn NOTRe e c'haller diazezañ ur politikerezh yezh lec'hel, evel ma lenner er mellad 104 a zispleger ennañ e sell ar politikerezhioù evit harpañ ar yezhoù rannvro ouzh barregezhioù boutin da veur a strollegezh.
- **E Breizh e oa bet sinet ur c'hendivizad a-ziforc'h evit treuzkas yezhoù Breizh ha diorren an implij anezhe er vuhez pemdez** e 2015 etre ar Stad (Prefeti hag ar Rektorelezh akademiezh), skolioù-meur Roazhon 2 ha Breizh-Izel, ha Rannvro Breizh, ha diwar se e oa gallet diazezañ gouestloù ar gevelerien war palioù hag oberoù boutin evit ar pennad 2015-2020 (diorren ha treuzkas yezhoù Breizh, broudañ da ober gant yezhoù Breizh er vuhez pemdez hag el lec'hioù foran).
- **Er c'helc'hlizher niv. 2017-072 eus an 12 a viz Ebrel 2017 diwar-benn kelenn ar yezhoù hag ar sevenadurioù rannvro** e lavarer « Kelennadurezh ar yezh rannvro er mod divyezhek galleg-yezh rannvro a sikour lakaat barregezhioù ar skolidi a-fet spered, yezhoù ha sevenadur da vont war-raok. Treuzkaset e vez ar yezhoù rannvro ha war ar memes tro e vez solutaet deskoni ar galleg ha prientet ar vugale da zeskiñ yezhoù all ».

II. Lodenn gentañ

Stad an traoù evit ar brezhoneg hag ar gallaoueg en Aodoù-an-Arvor

DIGORADUR

E departamant Aodoù-an-Arvor e oa 598 814 a dud o chom ennañ d'ar 1^{añ} a viz Genver 2017, da lavaret eo 18,04 % eus ar boblañs e Rannvro Breizh⁶.

Evit a sell ouzh ar yezhoù rannvro en Aodoù-an-Arvor, e vez implijet ar brezhoneg, ur yezh keltiek, hag ar gallaoueg, ur yezh romanek, a zo o-div en arvar bras evit an dekvloazioù da zont. Lakaet int bet gant an UNESCO, en Atlas ar yezhoù en arvar er bed e-touez ar yezhoù « en arvar bras⁷ ». Emañ an traoù er stad-se da gentañ-tout abalamour ma oa paouezet an dud da zeskiñ brezhoneg er familhoù eus an eil rummad d'egile en eil lodenn an XX^{vet} kantved.

Koulskoude n'haller ket lakaat an div yezh keñver-ha-keñver, koulz evit ar goulenn sokial hag evit ar mod ma vez santet stad an traoù gant ar gomzerien. Ar brezhoneg zo ur yezh keltiek hag a zo disheñvel-

mik diouzh ar galleg hag ar vrezhonegerien a oar splann e komzont ur yezh difer. Diazezet eo ar reolennoù hag ar yezhadur ha stabilaet eo an doare-skrivañ. Un hengoun dre skrid zo hep paouez ebet abaoe an VIII^{vet} kantved, n'eus ket bet paouezet da sevel gerioù nevez evit mont diouzh an ezhommoù.

Evel an normaneg, an anjeveg, ar poateveg ha re all, ec'h eo ar gallaoueg ur yezh oil⁸ deuet diwar al latin pobl. Testeniekaet eo ar gallaoueg abaoe an XII^{vet}-XIII^{vet} kantved. Gwelet a reer kement-se gant un toullad roudoù dre skrid, evel al Livre des manières gant Stefan Felger (1178). Komzet e vez gallaoueg muioc'h evit na vez skrivet, evit meur a abeg istorel ha sokiologel, met ur pemzek vloaz zo ez eus bet savet un doare-skrivañ evit unvanaat : an ABCD.



6 Mammenn EBSSA : <https://www.insee.fr/fr/statistiques/4273454> (sellet e oa bet ouzh ar bajenn-se d'an 12 a viz Genver 2021).

7 Hervez an termen-se e vez « komzet ar yezh gant an dud-kozh ; ha pa c'hall rummad an dud kompren anezhi, ne gomzont ket etreze pe gant o bugale ». Neuze ne vez ket mui desket ar yezh-se gant ar vugale er gêr evel yezh-vamm.

8 Ur familh yezhoù romanek enni parlantoù eus hanterenn norzh Frañs.

1- AN TRAOÙ PENNAÑ LAKAET WAR WEL GANT AN ENSKLASK SOKIOYEZHONIEL E 2018 (TMO RANNVRO BREIZH)


Gant an enklask sokioyezhoniel kaset da benn e 2018 gant Rannvro Breizh e teuer da c'houzout hiroc'h war stad an div yezh-se.

Uhel a-walc'h eo dregantad an dud a lavar e vefent laouen ma vefe roet muioc'h a lañs d'ar brezhoneg, ha gwelet a reer aze ez eus ur c'hoant bras a-fet brezhoneg ha tomm eo an dud ouzh o yezh da vat. Daoust ma seblant niver (**war-dro 207 000**) ha dregantad (**5,5 %**) ar vrezhonegerien bezañ stabil a-walc'h, ez eus peadra da vezañ nec'het gant stad ar brezhoneg. Setu amañ an traoù pennañ lakaet war wel gant an enklask diwar-benn ar vrezhonegerien :

- niver ar vrezhonegerien ac'h a war zigreskiñ
- mont a reont war goshaat buanoc'h-buan pa'c'h int 70 vloaz well-wazh (63 bloaz e 2007) ha 79 % anezhe zo en tu all da 60 vloaz
- pouez ar skolioù, al lec'hioù pennañ ma vez desket brezhoneg gant ar remziadoù yaouank (90 % eus ar re a zo etre 15 ha 24 bloaz). N'eo ket ken krenn-se stad ar brezhoneg : splann eo e vez gouvezet ha komzet nebeutoc'h-nebeut, met peadra zo d'esperout bepred. Kentañ tra, ha pa vefe niver ar vrezhonegerien o tigrskiñ e chom bras a-walc'h, ha war a seblant eo stabilaet niver an dud a gomz brezhoneg bemdez war-dro 50 000. Eil tra, tomm eo ar Vretoned ouzh ar brezhoneg bepred ha konstant e vefent da welet reiñ muioc'h a lañs d'ar c'helenn divyezhek ha d'ar panelloù divyezhek er pemp departamant ac'h a d'ober Breizh istorel. Berzh a ra ar c'hentelioù evit an dud vras – stajoù, kentelioù-noz ha dre lizher – ha delc'hen a ra niver ar vugale da vont war gresk da vat en hentadoù divyezhek.

Evit ar gallaoueg, ur yezh ha n'eo ket stank an titouroù a zo bet dastumet diwar he fenn betek-henn, e oa bet gallet gant an enklask renabliñ **191 000 a gomzerien** en holl, da lavaret eo 5,1 % eus an dud e Breizh. Ken nec'hus eo stad an traoù hag ar pezh a sell ouzh ar brezhoneg. Gant an enklask ez eus bet gwelet ne oa ket brudet nag anavezet a-walc'h ar gallaoueg.

Hiziv an deiz e vez kreñvoc'h-kreñv an harp roet d'ar gallaoueg gant ar strollegezhioù tiriadel ha kemeret e vez e kont gant an Deskadurezh-Stad. Aesoc'h eo kelenn, lenn ha skrivañ gallaoueg gant an doare-skrivañ skoueriekaet ABCD. Arouet eo bet ar skritur-se gant an darn vrasañ eus an dud ha hiziv an deiz e vez implijet gant al lodenn vrasañ eus ar skrivagnerien c'hallaouek, ar c'hevredigezhioù, evel an Ensavadur ar gallaoueg, Qerouézée, CAC Sud 22 ha Cllâssiers, pe strollegezhioù zo evel Kuzul-rannvro Breizh. N'eus ket pell zo eo krog an Deskadurezh-Stad da zegas un tamm kelennadurezh eus ar gallaoueg er skolioù kentañ derez, evel un taol-esa, gant an hentenn « 15 munut gallaouek bemdez » a zo bet savet e bro Gwern-Porc'hoed (Mor-Bihan). Muioc'h-mui e vez degemeret ar gallaoueg en tu all d'an tachennoù sevenadurel rik ha roet e vez lañs d'ur bern traoù. Daoust ma'z eus peadra da vezañ laouen evit meur a abeg eo ret d'ar strollegezhioù sikour diorren ar gallaoueg ma fell dimp klevet ar yezh-se eus Breizh en dekvloazioù da zont c'hoazh.



Ar mod m'eo lodennet ar gomzerien dre zepartamant
(mammenn : enklask sokioyezhoniel, Rannvro Breizh, miz Gouere 2018)

2- STAD AR BREZHONEG EN AODOÛ-AN-ARVOR

Bezañ ez eus war-dro **50 000 a vrezhonegerien** en Aodoù-an-Arvor, da lavaret eo 23 % eus ar vrezhonegerien a zo e Breizh. Hervez an enklask sokioyezhoniell graet e 2018 ez eus war-dro 10 % eus an dud en tu all da 15 vloaz hag a oar brezhoneg. Evel ma ouzer a-walc'h, seul yaouankoc'h an dud, seul izelloc'h niver ha dregantad ar vrezhonegerien en o mesk. Koulskoude e weler un tamm lañs adarre e-mesk an dud dindan 25 bloaz gras d'ar c'helenn divyezhek a zalc'h da vont war greskiñ.

En departamant-mañ e vez graet un tamm stankoc'h gant ar brezhoneg evit e lec'h all ; un drederenn eus ar vrezhonegerien a gomz brezhoneg bemdez, pa ne vez graet nemet gant 20 % well-wazh e Breizh a-bezh.

3- STAD AR GALLAOUEG EN AODOÛ-AN-ARVOR


Bezañ ez eus war-dro **50 000 a c'hallaouegerien** en Aodoù-an-Arvor, da lavaret eo 25 % eus ar c'hallaouegerien a zo e Breizh. Hervez an enklask sokioyezhoniell graet e 2018 ez eus war-dro 10 % eus an dud en tu all da 15 vloaz en Aodoù-an-Arvor hag a lavar komz gallaoueg.

Diazezet mat eo ar gallaoueg er maezioù : 13 % eus ar c'hallaouegerien a gomz gallaoueg bemdez, 16,7 % eus an dud en departamant-mañ a lavar e klevont gallaoueg en-dro dezhe ur wech ar miz d'an nebeutañ. E Kreiz-Breizh, lec'h m'eo stankoc'h niver ar c'hallaouegerien, ez eus tost d'un den diwar dri (31,7%) hag a glev gallaoueg ur wech ar miz d'an nebeutañ.

Tomm-tre eo an dud ac'hann ouzh ar brezhoneg. Komzet e vez brezhoneg ingal – ur wech ar sizhun d'an nebeutañ – gant un tamm ouzhpenn an hanter eus ar vrezhonegerien, ar pezh na vez graet nemet gant 20 % e Breizh a-bezh.

E-pad pell ne veze desket brezhoneg nemet e-barzh ar familhoù. 82 % eus ar vrezhonegerien en Aodoù-an-Arvor o deus desket evel-se, gant o zud. E-mesk ar re a zo dindan 40 vloaz eo ar c'helenn en deus kemeret plas ar familhoù : tost da 70 % anezhe o deus desket brezhoneg er skol.

Desket e vez gallaoueg e-barzh ar familhoù da gentañ-penn : ouzhpenn an tri c'hard eus ar c'hallaouegerien o deus desket gallaoueg gant o zud hag o zud-kozh. Dav eo degas da soñj eus pouez ar re-se, dreist-holl e-mesk ar c'hallaouegerien a zo dindan 40 vloaz o deus desket gant o zud-kozh evit al lodenn vrasañ anezhe. Dalc'het e vez da zeskiñ gallaoueg er familhoù bepred, gant se eo kreñvaet e blas er maezioù.



4- AR C'HELENN HAG AR STUMMAÑ EVIT AR RE VRAS

Al liesseurted yezhoù, a zo pouezus-bras evit staliañ un endro sevenadurel pinvidik, ha degas da soñj eus ar gwirioù sevenadurel a sell ouzh « frankiz an den da reiñ ha da gaout ur gelennadurezh eus hag en e yezh ha yezhoù all (...) » a laka an oberoù evit sikour kelenn yezhoù Breizh e-kreiz ar politikerezhioù a rankomp sevel.

4.1. Ar c'helenn divyezhek galleg-brezhoneg⁹

Ar c'helenn divyezhek a dalvez kelenn e div yezh. Er c'helenn divyezhek e vez implijet an div yezh evel benveg evit kelenn. Heñvel eo ar programmoù ouzh ar pezh a vez graet e kement klas pe skol a vefe. Tri hentad divyezhek zo : ar skolioù Diwan dre soubidigezh, ar c'hlasoù divyezhek er skolioù publik ha re ar skolioù katolik. Digoret en doa Diwan e glas divyezhek kentañ er skol-vamm e 1977. Abaoe 1982 ez eus bet digoret klasoù divyezhek er skolioù publik gant an Deskadurezh-Stad. Abaoe 1990 ez eus klasoù divyezhek e skolioù an Deskadurezh Katolik.

Daou seurt kelenn divyezhek zo :

- ur c'helenn « hanter-ouzh-hanter » gant 50 % eus an amzer e brezhoneg ha 50 % e galleg.

- ur c'helenn « dre soubidigezh » er skolioù Diwan.

Enne ne vez graet nemet gant ar brezhoneg betek ar CP, implijet e vez ar galleg tamm-ha-tamm adalek ar CE1 ha kresket e vez al lodenn c'hallek betek ar CM2. Gant ar soubidigezh e vez lakaet ar skolidi e darempred gant ar brezhoneg e-pad pelloc'h amzer e penn kentañ o zreugad er skol evit klask tapout ur gwir gempouez a-fet mestroniañ an div yezh.

E distro-skol 2020 e oa **2 608 a skolidi divyezhek** e departamant Aodoù-an-Arvor, en o mesk 638 er skolioù Diwan (24,47 %), 1 525 er skolioù publik (58,47 %) ha 445 er skolioù prevez (17,06 %). Lodennet eo ar skolidi-se etre 96 skol en departamant.

ROUEDAD	SKOL-VAMM	SKOL-GENTAÑ	KENTAÑ DEREZ EN HOLL	SKOLAJ	LISE	EN HOLL
DIWAN	182	248	430	208	0	638
PUBLIK	585	729	1 314	167	44	1 525
KATOLIK	162	187	349	86	10	445
EN HOLL	929	1 164	2 093	461	54	2 608

Skolidi divyezhek - Departamant Aodoù-an-Arvor (2020)
(mammenn : Ofis publik ar brezhoneg)

ROUEDAD	SKOL-VAMM	SKOL-GENTAÑ	SKOLAJ	LISE	EN HOLL
DIWAN	8	8	1	0	17
PUBLIK	29	22	5	1	57
KATOLIK	10	9	2	1	22
EN HOLL	47	39	8	2	96

Niver ar skolioù divyezhek - Departamant Aodoù-an-Arvor (2020)
(mammenn : Ofis publik ar brezhoneg)

⁹ N'eus ket eus ar c'helenn divyezhek galleg-gallaoueg.

Ur c'hresk 20 % eus niver ar skolidi zo bet etre 2010 ha 2020, ha gwelet ez eus bet un tamm digresk e distro-skol 2020 (0,6 % nebeutoc'h e-keñver 2019), da gentañ-penn abalamour d'ar gwall blegenn a-fet yec'hed, pa n'eus ket gallet kelaouiñ ar familhoù a-raok an distro-skol evel ma kustumer ober. A-hend-all, ha pa ne vefe ket gwall uhel ar c'hresk abaoe 2016, e ranker lakaat se keñver-ha-keñver gant digresk an niver a skolidi dre vras er skolioù kentañ derez abaoe 2009, koulz er skolioù unyezhek ha divyezhek en departamant (12 % nebeutoc'h en ur ober 11 vloaz).

ROUEDAD	2010	2011	2012	2013	2014	2015	2016	2017	2018	2019	2020
DIWAN	639	670	657	688	684	715	760	728	708	694	638
PUBLIK	1 161	1 186	1 230	1 259	1 305	1 290	1 306	1 386	1 461	1 494	1 525
KATOLIK	376	387	405	377	406	425	475	478	424	437	445
EN HOLL	2 176	2 243	2 292	2 324	2 395	2 430	2 541	2 592	2 593	2 625	2 608

Emdroadur niver ar skolidi divyezhek eus ar skol-vamm d'al lise - Departamant Aodoù-an-Arvor (2010-2020)
(mammenn : Ofis publik ar brezhoneg)

E-barzh ar rouedad Canopé emañ TES (Ti-Embann ar Skolioù), staliet e Sant-Brieg, a vez o sevel hag oc'h embann danvez pedagogel evit an hentadoù divyezhek ha dre soubidigezh.



- Kinnig betek al lise
- Kinnig betek ar skolaj
- Kinnig er c'hentañ derez
- Kinnig ebet
- Bevennoù departamant

Ar c'hinnig kelenn divyezhek evit pep bro - Departamant Aodoù-an-Arvor (2020)
(mammenn : Ofis publik ar brezhoneg)

4.2. An tañva hag ar c'helenn da zibab

4.2.1. An tañva hag ar c'helenn da zibab evit ar brezhoneg

• Er c'hentañ derez :

N'eus ket eus ar brezhoneg evel danvez da zibab er c'hentañ derez. Desket e vez brezhoneg dre an « tañva » ; e-giz-se e c'hall ar skolidi er c'hentañ derez n'emaint ket en un hentad divyezhek ober anaoudegezh gant ar brezhoneg. Hiziv an deiz e vez kinniget un tañva eus ar ar brezhoneg en Aodoù-an-Arvor e Dinan.

• En eil derez :

E 2020 e oa **786 a skolidi** o teskiñ brezhoneg en eil derez (725 er skolioù publik, 61 er skolioù prevez). Kinniget e vez en ober er skolaioù hepken, pe dost, peogwir e kaver tost da 80 % eus ar skolidi-se enne.

ROUEDAD	SKOLAJ	LISE	EN HOLL
PUBLIK	602	123	725
KATOLIK	14	47	61
EN HOLL	616	170	786

Kelenn ar brezhoneg da zibab en eil derez - Departamant Aodoù-an-Arvor (2020)
(danvez da zibab er skolaj, yezh vev el lise)
(mammenn : Ofis publik ar brezhoneg)

Aet eo ar c'hinnig evit ar c'helenn dre zibab war zigreskiñ. Un digresk 20 % eus niver ar skolidi en eil derez zo bet e brezhoneg da zibab etre 2010 ha 2020 en Aodoù-an-Arvor, ar pezh a zo liammet gant ar c'hinnig a vez o telc'hen digreskiñ e-kerzh ar pemzek vloaz diwezhañ. En Aodoù-an-Arvor omp tremenet eus 32 skol e 2009 da 18 e 2019 lec'h ma vez kinniget an danvez da zibab (47% nebeutoc'h en ur ober 10 vloaz).

ROUEDAD	2010	2011	2012	2013	2014	2015	2016	2017	2018	2019	2020
PUBLIK	841	890	914	870	905	890	876	772	733	777	725
KATOLIK	134	143	149	120	87	50	136	157	118	84	61
EN HOLL	975	1 033	1 063	990	992	940	1 012	929	851	861	786

Emdroadur niver ar skolidi e brezhoneg en eil derez
Departamant Aodoù-an-Arvor (2010-2020)
(mammenn : Ofis publik ar brezhoneg)

4.2.2. An tañva hag ar c'helenn da zibab evit ar gallaoueg

Ha pa vefe ar gallaoueg ar yezh oil nemeti a vez kelennet e Frañs, n'eus ket eus ar c'helenn divyezhek galleg-gallaoueg betek-henn.

• Er c'hentañ derez :

Etre 2005 ha 2019 e oa bet ar gevredigezh Dihun Breizh o kinnig abadennoù ur wech ar sizhun evit ober anaoudegezh gant ar gallaoueg en un toullad skolioù en Aodoù-an-Arvor. Evit reiñ lañs da gelennadurezh ar brezhoneg e vez kinniget kentelioù gallaoueg bemdez, abaoe distro-skol 2017, gant ar gevredigezh « Cllâs-siers », ha sikour a ra ar gelennerien war dachenn ar bedagogiezh gant ar benveg pedagogel « 15 munut gallaouek bemdez » e-barzh ar rouedad Admézé¹⁰. Sevel a ra ar gevredigezh ivez ostilhoù deskiñ gallaoueg evit an tri c'helc'hiad a zo er skolioù kentañ derez.

150 a skolidi o doa bet un tañva eus ar gallaoueg e-kerzh ar bloavezh skol 2019-2020 e c'hwec'h skol en Aodoù-an-Arvor (3 skol bublik : Kaouennieg, Sant-Brieg, Bosez-Poudour ; 3 skol brevez : Sant-Barnev, Kez, Gwitei).

ROUEDAD	2009	2010	2011	2012	2013	2014	2015	2016	2017	2018	2019	EN HOLL
PUBLIK-KATOLIK	56	50	150	475	252	200	238	575	545	-	150	2 691

Emdroadur niver ar skolidi o doa bet un tañva eus ar gallaoueg er c'hentañ derez
Departamant Aodoù-an-Arvor (2009-2019)
(mammenn : Ofis publik ar brezhoneg)

• En eil derez :

Hiziv an deiz e vez kelennet gallaoueg en eil derez publik dreist-holl hag en Aodoù-an-Arvor eo e vez graet ar muiañ. Diwar an 12 skol bublik e Breizh lec'h ma vez kinniget kentelioù gallaoueg, ez eus 4 skolaj (Plezeved, Medrigneg, Bronn, Plened-Yugon) ha 2 lise (Lambal ha Dinan) en departamant-mañ. Mont a ra skolidi ar re-se d'ober an div drederenn eus ar skolidi a zo o teskiñ gallaoueg en eil derez e Breizh. E skolaj Plened-Yugon e kaver ar muiañ a skolajidi hag a zo o teskiñ gallaoueg (92 skoliad e distro-skol 2019). E distro-skol e oa 217 skoliad er c'hentelioù gallaoueg en Aodoù-an-Arvor.

ROUEDAD	SKOLAJ	LISE	EN HOLL
PUBLIK	154	63	217
KATOLIK	0	0	0
EN HOLL	154	63	217

Kelenn ar gallaoueg da zibab en eil derez - Departamant Aodoù-an-Arvor (2020)
(danvez da zibab er skolaj, yezh vev el lise)
(mammenn : Ofis publik ar brezhoneg)

¹⁰ Er rouedad Admézé eo bodet ar skolioù a ra gant an hentenn deskiñ « 15 munut gallaouek bemdez »

Cheñchet eo an traoù evit ar c'hentelioù gallaoueg abaoe adreizh ar skolaioù lakaet da dalvezout e distro-skol 2016. Er skolaioù e c'haller kaout un tañva eus ar gallaoueg er 6^{vet}. Danvez ar c'hentelioù eo ar gallaoueg hag ivez sevenadur Breizh-Uhel. Eus ar 5^{vet} d'an 3^{vet} klas e c'hall ar skolidi a fell dezhe deskiñ gallaoueg evel danvez ouzhpenn (1 eur er 5^{vet} ha 2 eur er 4^{vet} hag en 3^{vet}). Gallout a reer deskiñ gallaoueg el lise ivez hervez an adreizh diwezhañ a sell ouzh al liseoù hag ar vachelouriezh, lakaet da dalvezout adalek distro-skol 2019.

ROUEDAD	2010	2011	2012	2013	2014	2015	2016	2017	2018	2019	2020
PUBLIK	270	286	295	325	354	344	379	355	324	256	217
KATOLIK	-	-	-	-	-	70	57	104	65	33	0
EN HOLL	270	286	295	325	354	414	436	459	389	289	217

Emdroadur niver ar skolidi a oa o teskiñ gallaoueg en eil derez
 Departamant Aodoù-an-Arvor (2010-2020)
 (mammenn : Ofis publik ar brezhoneg)

4.3. Deskadurezh uhel

4.3.1. Kelennadurezh ar brezhoneg

Abae 1991 ez eus ur stummadur gant EBUKD Breizh (Ensavadur broadel uhel ar c'helenneriezh hag an deskadurezh) e Sant-Brieg, da-geñver ar master « MKDS – meneg derez kentañ¹¹ », evit prientiñ ar genstrivadeg a-ratozh yezhoù rannvro evit tuta kelennerien ar skolioù barrek da gelenn brezhoneg hag e brezhoneg er c'hlasoù divyezhek (an hentad kelenn er skolioù divyezhek). Evel-se eo e skourr Sant-Brieg e vez stummet an holl gelennerien divyezhek a labour er skolioù publik e Breizh (60 studier enskrivet e distro-skol 2020¹²).

Abae 2004 e c'hall ar studierien en Aotreegezh er skourr eus Skol-veur Breizh-Uhel a zo staliet e Sant-Brieg kemer ar brezhoneg evel danvez diret (12 studier enskrivet e distro-skol 2019).

Evit ar c'helenn dre soubidigezh gant Diwan, stummet e vez ar gelennerien er greizenn Kelenn e Kemper a zo dindan gevrat gant EBUKD Breizh, Skol-veur Roazhon 2 ha Skol-veur Breizh-Izel e Brest. Eno e vez prientet ar Master « MKDS – kelenn divyezhek dre soubidigezh » (23 studier e 2019-2020) hag ar genstrivadeg da vont da gelenner ar skolioù ; un ugent kelenner bennak a vez eno ivez e stummadurioù war ar bedagogiezh. Emañ Kelenn e-barzh Ensavadur uhel yezhoù Republik Frañs (EUYRF) lec'h m'eo bodet ar c'hreizennoù stummañ stag ouzh ar pemp rouedad kelenn dre soubidigezh abaoe 1996.

4.3.2. Kelennadurezh ar gallaoueg

Ne vez ket kelennet gallaoueg en Deskadurezh uhel en Aodoù-an-Arvor. Kelennet e vez ar gallaoueg er skol-veur avat. Abaoe 2008 e c'hall an holl studierien en aotreegezh a zo enskrivet e stummerezh kentañ studiañ ar gallaoueg evel danvez da zibab gant Kreizenn ar Yezhoù e Skol-veur Roazhon 2, pe

evit delc'hen ganti pe evit kaout un tañva, gant 1 eurvezh sokioyezhoniezh ha 2 eurvezh deskiñ ar yezh bep sizhun. Cheñch-dicheñch eo niver ar studierien eus an eil bloaz d'egile (12 studier e 2019-2020).

11 Micherioù ar c'helenn, an deskadurezh hag ar stummañ, derez kentañ.

12 Kreskiñ a ra niver ar studierien en MKDS e Sant-Brieg diouzh niver ar postoù a vez lakaet er genstrivadeg tuta.

4.4. Ar c'hentelioù hag ar stummañ evit an dud vras

4.4.1. Ar c'hentelioù-noz, ar stajoù hag ar stummadurioù war ar brezhoneg

• Ar c'hentelioù-noz :

Aodoù-an-Arvor eo an departamant, war-lerc'h Penn-ar-Bed, lec'h ma vez ar muiañ a dud vras o teskiñ brezhoneg er c'hentelioù-noz. **689 a dud vras** a oa bet er c'hentelioù-noz war ar brezhoneg, forzh peseurt live e vefent, en departamant e 2019.

Da-heul ar politikerezh evit frammañ ha diorren an emglevioù-bro, Ti ar Vro Gwengamp, Ti ar Vro Treger ha Goueloù ha Ti ar Vro Sant-Brieg / L'Ôté e Sant-Brieg, e vez muioc'h a dud o teskiñ evit na oa dek vloaz zo en Aodoù-an-Arvor (+ 18 % evit ar mare 2010-2020).

2009	2010	2011	2012	2013	2014	2015	2016	2017	2018	2019
582	575	656	606	707	769	795	760	718	703	689

Emdroadur niver an dud er c'hentelioù-noz war ar brezhoneg - Departamant Aodoù-an-Arvor (2009-2019)
(mammenn : Ofis publik ar brezhoneg)

• Ar stajoù hag ar stummadurioù :

En Aodoù-an-Arvor ez eus tri lec'h (Gwengamp, Lannuon ha Sant-Brieg) ma vez graet stummadurioù d'an daoulamm war ar brezhoneg (6 miz, 3 miz) gant div stal a vicher (Stumdi ha Roudour). 35 a dud o doa kemeret perzh er stummadurioù-se e 2018-2019.

E-mesk ar stajoù a vez kinniget e kaver ivez re verr hag a bad un dibenn-sizhun pe ur sizhun, gant kevredigezhioù. 266 a dud a oa bet e stajoù seurt-se e 2018- 2019 en Aodoù-an-Arvor.

Gant KBMPT Breizh e vez kinniget stummadurioù war ar brezhoneg ivez en Aodoù-an-Arvor, Penn-ar-Bed, an Il-ha-Gwilen hag er Mor-Bihan, da-heul an divizadegoù kemeret asambles gant Kuzul-rannvro Breizh hag ar c'huzulioù-departamant war an ezhomm a-fet stummañ implijidi ar strollegezhioù war ar brezhoneg. Peurvuiañ e vez graet un devezh stummañ hed-ha-hed bep sizhun, dirak an dud. Pep koulzad a bad 204 eurvezh, da lavaret eo 34 devezh e-kerzh ur bloavezh-skol.

4.4.2. Ar c'hentelioù, atalieroù komz ha stajoù gallaoueg :

N'eo ket gwall ledan c'hoazh ar c'hinnig stummañ war ar gallaoueg rak n'eo ket stank ar gelennerien hag ar stummerien war dachenn ar yezh-se. Ret eo neuze frammañ ar c'hinnig, dezhañ da c'hallout tapout lañs ha da vezañ diazezet war hir amzer e bed ar stummañ micherel hag ar c'hentelioù dudi evit an dud vras.

Tapet ez eus lañs er bloavezhioù diwezhañ gant kentelioù aozet gant kevredigezhioù abalamour da respont da ezhommoù difer (studierien, retredidi...). Al lodenn vrasañ eus ar c'hentelioù-se evit tud vras zo abadennoù ingal evit pleustriñ, kaozeal, adkregiñ gant ar gallaoueg ha sikour tud zo da wellaat o anaoudegezh eus ar yezh-se. Hiziv an deiz e weler tri seurt kinnigoù : ar c'hentelioù-noz, an atalieroù komz hag ar stajoù.

• Ar c'hentelioù-noz :

Abae 2017 e vez graet div gentel bep miz gant ar gevredigezh « l'École du Rna » e Tremorae, gant un dek bennak a dud a vez o teskiñ (8 den e 2019).

• An atalieroù komz :

Dalc'het e vez daou atalier komz div wech ar miz en departamant, unan e Sant-Brieg gant Ofis Retredidi Sant-Brieg (12 den e 2019), egile e Loudieg gant CAC-Sud 22 (6 den e 2019).

Mareoù pleustriñ eo an atalieroù-se, ma vez an dud o kaozeal, o tegas traoù an eil d'egile, o lakaat o yezh hag o sevenadur da vevañ.

• Ar stajoù :

Da-geñver « Mizvezh ar gallaoueg » a vez aozet bep bloaz gant Rannvro Breizh e vez un devezh deskiñ gallaoueg e Sant-Brieg gant emglev bro Sant-Brieg Telenn-L'Ôté, asambles gant ar gevredigezh Qerouézée.

Evit echuiñ, e miz Gouere e vez dalc'het ar festival « Les Assemblées Galèzes » evit brudañ sevenadur Breizh-Uhel, ha kinniget e vez gante bep bloaz ivez ur staj d'ober anaoudegezh gant ar gallaoueg e Perenezeg.

5- OBEROÙ AR STROLLEGEZHIOÙ LEC'HEL EVIT AL LIESSEURTED YEZHOU

Tomm-tre eo merc'hed ha paotred Aodoù-an-Arvor ouzh o hêrezh sevenadurel, hag o yezhoù da gentañ-penn. Diwar se ez eus ur goulenn sokial evit lakaat ar brezhoneg muioc'h war wel (evit ouzhpenn an tri c'hard eus an dud) hag un tamm nebeutoc'h evit ar gallaoueg (war-dro un drederenn eus an dud).

Gwelet e vez ar santimant-se hag ar goulenn sokial ivez e-barzh politikerezh ar c'humunioù hag an diazezadurioù publik a genlabour etrekumunel (DPKE) a ouestl miret ha broudañ al liesseurted yezhoù pa sinont ar c'hartaou « Ya d'ar brezhoneg » ha « Du galo, dam Yan, dam Vêr »¹³, pe pa savont o folitikerezh yezh dezhe o-unan.

5.1. Ar garta « Ya d'ar brezhoneg »

E 2001 e oa bet lañset ar c'houlzad « Ya d'ar brezhoneg » gant Ofis publik ar brezhoneg (OPAB) a vez o kas anezhañ war-raok bepred evit broudañ an implij eus ar brezhoneg er bed foran hag e-mesk an obererien er vuhez foran hag en ekonomiezh er vro. Diazezet eo war ur garta ma kinniger kas darn eus tri seurt oberoù da benn (lakaat ar brezhoneg war wel, lakaat anaoudegezh ar yezh da greskiñ, implijout ar yezh er servijoù) ha diouzh meur a live engouestl (4 live en holl), abalamour d'ar sinerien (staloù, kumunioù, etrekumuniezhioù) da gemer ar brezhoneg e kont en o oberoù, diouzh ma vezont gouest da respont d'ar goulenn sokial a sav ha da lakaat kalite an divyezhegezh da vont war-raok er vuhez pemdez.

En Aodoù-an-Arvor e oa bet sinet ar garta « Ya d'ar brezhoneg » gant 50 kumun¹⁴ ha 2 etrekumuniezh¹⁵ d'ar 1^{añ} a viz Genver 2021. Gant se e sell ar c'houlzad « Ya d'ar brezhoneg » da dost da 180 000 a dud en Aodoù-an-Arvor.

Gallout a ra an dud gwelet war ar pemdez efedoù ar garta. Lannuon, a zo e Bro-Dreger lec'h ma vev tost d'un drederenn eus an dud e kumunioù sinet ar garta gante, eo an deirvet kêr evit a sell ouzh ar

boblañs ec'h eo bet tizhet al label live 2 eus ar garta ganti, goude Kemper ha Lannarstêr. Deuet eo da vezañ ur skouer vat gant ar panelloù divyezhek staliet er batisoù hag en aveadurioù a vez meret ganti

(panelloù en diavaez hag en diabarzh, plakennoù-straed, panelloù heñchañ pe kelaouiñ ha kement zo), ar pezh a laka an dud da vevañ en un endro divyezhek kempouesoc'h-kempouez.

E bro Sant-Brieg, lec'h ma vev un den diwar dek en ur gumun sinet ar garta ganti, he doa gouestlet Ti-kêr Sant-Brieg, pennlec'h an departamant, p'he doa sinet ar garta e miz Kerzu 2019, seveniñ c'hwec'h ober evit ar brezhoneg dindan tri bloaz, en o mesk staliañ panelloù divyezhek pa 'c'h eer e-barzh pe e-maez kêr, lakaat pennadoù-stur divyezhek en traoù embannet gant ar gumun, reiñ lañs d'ar c'helenn divyezhek ha kemer perzh er c'houlzad a vez bep bloaz evit brudañ ar c'hentelioù brezhoneg evit an dud vras.



13 « Gallaoueg, ya evel-just ! »

14 27 kumun a ouestl tizhout al live 1, 16 al live 2 ha 7 al live 3.

15 1 etrekumuniezh a ouestl tizhout al live 1 (Gwengamp-Pempoull Tolpad-kêrioù), 1 al live 2 (Lannuon-Treger Kumuniezh).

5.2. Ar garta « Du Galo, dam Yan, dam Vèr »

E 2015 e oa bet lañset ar c'houlzad « Du Galo, dam Yan, dam Vèr » gant Ensavadur ar gallaoueg a vez o kas anezhañ war-raok bepred evit broudañ an implij eus ar gallaoueg er bed foran hag e-mesk an obererien er vuhez foran hag en ekonomiezh er vro, ar strollegezhioù hag etrekumuniezhioù, ar c'hevredigezhioù hag ar stalioù.

Evit en ober e kinnig ar garta tri live engouestl hag un tregont ober evit reiñ ur plas d'ar gallaoueg tamm-ha-tamm e buhez ar Vretoned. Da bep aoza-dur da welet ar mod a gordo ar gwellañ gant e jeu (mod da labourat, tachenn prederiañ pe pleustriñ) hag ar mod m'emañ e-sell da vont war-raok.

En Aodoù-an-Arvor eo bet sinet ar garta gant 12 kumun, Lambal en o mesk, ha dreist-holl kumunioù e-barzh Sant-Brieg Arvor Tolpad-kêrioù pe Lambal Arvor hag Argoad¹⁶. Hiziv an deiz eo en Aodoù-an-Arvor e kaver 43 % eus ar c'humunioù o deus sinet ar garta « Du galo, dam Yan, dam Vèr », ha 7,4 % eus an dud en departamant zo o vevañ en unan eus ar c'humunioù-se.

Ar strollegezh kentañ he doa sinet ar garta e 2015 e oa kumun Tremorae lec'h ma oa bet dalc'het, diwar goulenn an Ensavadur ar gallaoueg, an emvod kentañ gant ar c'humunioù eo bet sinet ar

Garta « du Galo, dam Yan, dam Vèr » gante, e fin 2019. En emvod-se e oa bet ur pemzek strollegezh bennak ha war-dro ugent dilennad.

Gouestlañ a ra ar re a sin ar garta reiñ ur plas d'ar gallaoueg e buhez o c'humun hag en ober war un dro gant ul « labour war identelezh o zerouer ». Embann a reont e vez degaset ul liamm difer etre ar c'hallaouegerien, ul liamm stag ouzh ar galon hag etre ar remziadoù.



¹⁶ Dek kumun a ouestl tizhout al live 1 hag an 2 all al live 2.

6- OBEROÙ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ

Meur a gevredigezh a vez o sikour lakaat anavezout hag ober gant ar brezhoneg hag ar gal-laoueg en Aodoù-an-Arvor. Talvoudus-kaer eo o labour evit lakaat ar sevenadur da chom bev, lakaat anavezout ar glad yezhel ha brudañ ar modoù sevenadurel a bep seurt.

Un toullad bloavezhioù zo e vez roet harp gant Departamant Aodoù-an-Arvor d'ar c'hevredigezhioù-se evit o mont en-dro hag o oberoù, dreist-holl gant ar stignadoù evit ar sevenadur (bezañ arzel ha raktresoù sevenadurel en tiriadoù, abadennoù aozet gant an Departamant, kevredigezhioù ha raktresoù evit diorren sevenadurel an tiriad, hanterouriezh sevenadurel hag arzel, rouedadoù hag obererien kevredigezhel ha micherel diazez).

6.1. Ar c'hevredigezhioù a labour evit ar brezhoneg

Oberiant-tre eo ar c'hevredigezhioù a labour evit delc'hen bev ha reiñ lañs d'ar brezhoneg en Aodoù-an-Arvor. Stank a-walc'h eo an dud enne ha sikour a reont lakaat ar brezhoneg war wel el lec'hioù foran¹⁷.

Bezañ ez eus pevar emglev-bro hag a ginnig oberoù a bep seurt d'an dud war ar brezhoneg ha sevenadur Breizh (abadennoù dudi, stajoù, sonadegoù, prezennoù, filmoù ha kement zo) :

- Ti ar Vro Gwengamp,
- Ti ar Vro Treger-Goueloù e Kawan, a vez o verañ ar skourr eus Levraoueg Aodoù-an-Arvor gouestlet d'an dielloù brezhonek hervez ur c'henemglev palioù ha binvioù sinet gant Departamant Aodoù-an-Arvor,
- Ti ar Vro Sant-Brieg / L'Ôté e Sant-Brieg a ginnig muioc'h-mui a gentelioù brezhoneg a vloaz da vloaz,
- Raok-Brezhoneg e Kreiz-Breizh e Rostrenn a vez o kenurzhiañ ar c'hinnig a-fet kentelioù brezhoneg e Kreiz-Breizh hag o vroudañ an implij eus ar brezhoneg e bed ar sevenadur, en ekonomiezh hag en touristerezh.

Bezañ ez eus aozadurioù all, el lec'h-mañ-lec'h, hag a ra traoù e brezhoneg pe a laka brezhoneg en abadennoù a vez kaset da benn gante (diglok eo ar renabl) :

- E-barzh meur a lec'hienn Internet e kinniger gweladennoù ha diduamantoù e brezhoneg gant kevredigezhioù, gant an animatourien vrezhonek a zo o labourat enne, evel Kreizenn ar son e Kawan, an Ekokreizenn e Pleuveur-Bodoù, Koed ar Barzh e Melioneg, Ti ar C'hoajoù er Chapel-Nevez ha Mirdi ar skol e Botoha
- Meur a festival a zalc'h kont eus ar brezhoneg en o frogramm, evel Gouel Kan ar Vartoloded (Pempoull) hag ar Festival Fisel (Rostrenn), ma'c'h a ar brezhoneg d'ober ul lodenn eus an endro gwelet (skritelloù, panelloù) ha klevet (displegadennoù e-kerzh an abadennoù, lakaomp).
- Renablet ez eus bet tri strollad c'hoariva brezhonek oberiant en departamant (Strollad Kallag, C'hoari Las ha Choukibenn) gant ar c'hevredad C'hoariva.

¹⁷ Diwar 189 post labour ETP ma ranker gouzout brezhoneg renablet e 2012 en Aodoù-an-Arvor e oa stag 25 ouzh bed ar c'hevredigezhioù (anez kontañ ar postoù e Diwan). E-mesk an implijerien en departamant ez eus ur radio (Radio Kreiz Breizh) hag un ti-embann (Kuzul ar Brezhoneg).

- Gant an UBAPAR (Unvaniezh Breizh buheziñ ar broioù diwar ar maez) e oa bet renablet unnek kamp vakañsoù brezhoneg en Aodoù-an-Arvor en 2016, hag a oa bet 204 a re yaouank o kemer perzh enne. Gant ar gevredigezh-se ivez e vez stummet an danvez renerien hag animatourien evit tapout o DABU hag o DARE e brezhoneg, anavezet gant ar Stad.
- Dudi Sant-Brieg zo ur greizenn-dudi vrezhonek hag a ginnig oberoù d'ar vugale e Sant-Brieg bep sizhun. Abaoe distro-skol 2018 e vez kinniget un dra heñvel gant Ti ar Vro Gwengamp ivez.
- Dastum Bro Dreger, evel Dastum Kerne a zo staliet e Rostrenn abaoe 2019, a ginnig ingal beilhadegoù lec'h ma vez graet gant ar brezhoneg.
- Ar Redadeg zo ur redadeg a-eiladoù evit ar brezhoneg hag a vez graet bep daou vloaz. An digarez e vez bep taol da welet abadennoù poblek e-leizh evit lakaat ar brezhoneg war wel en departamant (sonadegoù, festoù-deiz, festoù-noz, c'hoarioù,

redadegoù gant bugale ha kement zo). Lakaet e vez un toullad mat a obererien eus ar vro da gemer perzh evit aozañ tout an traoù-se, pe e vefent brezhonegerien o-unan pe tud hag a fell dezhe degas brud d'ar brezhoneg ha lakaat implijout anezhañ muioc'h.

- Ur bern abadennoù sevenadurel a vez aozet gant komiteoù skoazell ar skolioù Diwan a-hed ar bloaz (festoù, predoù, foarioù a bep seurt, abadennoù dudi ha kement zo).
- Radio Kreiz Breizh, staliet e Rostrenn, a laka ar brezhoneg da vevañ el lodenn vrezhonek eus an departamant tost da 40 vloaz zo.
- E-mesk ar c'hevredigezhioù liammet gant an deskadurezh divyezhek emañ Div yezh Breizh, emañ he sez e Rostrenn. Staliet he deus burevioù meles-tradurel e Kawan. 19 kevredigezh Div Yezh lec'hel, enne tud ar vugale, a sikour reiñ lañs d'an hentaoù divyezhek en Aodoù-an-Arvor.

6.2. Ar c'hevredigezhioù a labour evit ar gallaoueg

Evel evit ar brezhoneg ez eus un toullad mat a gevredigezhioù hag a labour evit lakaat anavezout, studiañ ha reiñ buhez d'ar gallaoueg en departamant :

- CAC Sud 22 e Sant-Karadeg a vez oc'h aozañ kaozeadennoù, stajoù a bep seurt hag ur genstrivadeg skrivañ.
- Ar c'hevredad Telenn – Ti ar Vro Sant-Brieg / L'Ôté e Sant-Brieg – a zegemer hag a sikour ar c'hevredigezhioù hag an oberoù evit yezh ha sevenadur Breizh-Uhel e Bro Sant-Brieg.
- Gant ar gevredigezh Qerouézée e vez aozet « Gallo en scène » bep bloaz e miz Du, 17 vloaz zo. Pouezus eo ar festival-se evit ar gallaoueg en Aodoù-an-Arvor. Ennañ e vez roet ton da veur a dra : kontadennoù, c'hoariva, gaouierien. Kinnig a ra ar gevredigezh obererezhioù e-leizh en-dro d'ar gallaoueg a-hed ar bloaz, evel stajoù gallaoueg, produiñ abadennoù bep sizhun evit daou radio staliet en departamant (RCF ha Bretagne 5), sevel ur rubrikenn c'hallaouek bemdez war Bretagne 5.

- Labourat a ra kevredigezhioù war dachenn ar c'han hepken (Ol'va, Les chantous de Loudiâ).
- Un toullad bloavezhioù zo e vez kinniget rubrikennoù gallaouek bemdez (war an amzer, atersiñ an dud a labour war dachenn ar gallaoueg ha kement zo) gant ar web media Billig Radio, e bro Loudieg.
- E meur a fest ivez e vez roet ur plas bras a-walc'h d'ar gallaoueg, evel en Assemblées Galèzes (ur staj evit ar vugale, kanañ, dañsal, sonerezh) pe La Truite du Ridor e Plezeved.
- Renablet he deus UBAPAR (Unvaniezh Breizh buheziñ ar broioù diwar ar maez) ur c'hamp vakañsoù gallaouek en Aodoù-an-Arvor e 2016 hag a oa bet 11 den yaouank o kemer perzh ennañ. Kampoù a oa bet e 2017, 2018 ha 2019 ivez.

Bep bloaz e vez sachet ur bern tud gant an abadennoù-se lec'h ma plij dezhe en em gavout asambles war-dro ar sevenadur pobl (c'hoariva, kanañ, dañsal, predoù, baleadennoù, sketchoù, kontadennoù ha kement zo).

Klozadur

Ha pa vefe yezhoù Breizh en arvar bras hiziv an deiz, dreist-holl abalamour m'eo erru kozh ar vrezhonegerien dre vras, e weler peadra da soñjal muioc'h-mui ez eus spi da gaout gant an oberoù a vez kaset da benn gant ar c'hevredigezhioù hag an obererien publik (kumunioù, kumuniezhioù, ensavadurioù publik).

E-mesk an obererien-se ez eus un toullad mat hag a vez o reiñ lañs d'ar yezhoù adarre ha gwelet a reer efed an oberoù-se e meur a dachenn en hor buhez pemdez : panelloù divyezhek war an hentoù hag e lec'h all, divyezhegezh abred e bed ar vugaligoù, sikour reiñ lañs da gelennadurezh ar brezhoneg hag e brezhoneg er skoloù, ur stignad evit deskiñ gallaoueg er c'hentañ derez, sikourioù a bep seurt d'ar c'hevredigezhioù a labour war an dachenn ha kement zo.

Evel ma oa bet gwelet gant an enklask sokioyezhoniell graet e 2018 eo kreñv ar c'hoant e-keñver ar brezhoneg e-mesk an dud e Breizh¹⁸. Evit ar brezhoneg, muioc'h-mui a dud a vez o teskiñ, dreist-holl abalamour ma'c'h a ar c'helenn divyezhek hag ar c'hentelioù evit an dud vras war greskiñ. Hag an obererien e bed ar gallaoueg, tamm-ha-tamm en em frammont evit sevel ur program oberoù war dachenn ar c'helenn hag evit kinnig kentelioù ha stajoù d'an dud.



18 74% eus ar Vretoned a vefe laouen o welet muioc'h a vrezhoneg er skolioù, ha 73% zo laouen o welet panelloù divyezhek gallek-brezhonek war an hentoù.

III. Eil lodenn

AR PROGRAMM OBEROÙ EVIT AR BREZHONEG HAG AR GALLAOUEG (2021-2026)

DIGORADUR

Bloavezhioù zo e vez sikouret oberoù ar c'hevredigezhioù evit mad ar brezhoneg, ar gallaoueg hag ar sevenadurioù a zo stag oute, gant Departamant Aodoù-an-Arvor. Daoust da se n'eus bet dalc'het kont eus an dalc'hoù liammet ouzh al liesseurtes yezhoù er C'huzul-departamant nemet nevez zo : deuet eo war wel da-heul al lezenn NOTRe votet d'ar 7 a viz Eost 2015, ma anavezzer splann ar gwirioù sevenadurel ; warni e c'haller diazezañ ur politikerezh yezh lec'hel evel ma'z eus merket er mellad 104, a lavarer ennañ ec'h eo ar politikerezhioù evit harpañ ar yezhoù rannvro tachenn meur a strollegezh.

Evit Departamant Aodoù-an-Arvor, sevel ur brastres evit yezhoù Breizh zo diskouez e youl da harpañ an implij eus ar yezhoù rannvro hag ar modoù a bep seurt ma vezont lakaet war wel. Krog eo da lakaat

ur brastres yezh da dalvezout evit mont war-zu an terkañ yezhel, gant ur programm war meur a vloaz hag a zleo sikour broudañ an dud adarre d'anavezout ar brezhoneg hag ar gallaoueg ha d'ober gante er vuhez sokial.

Ne vo dalc'het ar yezhoù-se bev nemet gant ma vo roet o flas dezhe er gevredigezh a vremañ. Evel ma'z eus merket e rentañ-kont Emgavioù Strasbourg diwar-benn efedusted ar politikerezhioù yezh, dalc'het d'ar 16 ha 17 a viz Meurzh 2016, e rank ar yezhoù rannvro « bezañ yezhoù "pleustrek" adarre, da lavaret eo ec'h eo arabat sellet oute evite o-unan met evel binvioù evit skoulmañ darempredoù, ober traoù, embann soñjoù hag ac'h a dreist dezhe. Gant ma vo adimplijet ur yezh evit traoù estroc'h evit ar yezh hec'h-unan e c'hallio mont war-raok. »



UR BRASTRES WAR EMDREIN BEPRED HAG A ROIO KALZ A BLAS D'AR C'HENDIVIZOÙ HA D'AR SKIANT-VAT

Goude bezañ graet stad an traoù ha kinniget meur a vod da labourat diwar ar pezh a vez graet gant e gevelerien, en deus savet an Departamant un diagnostik diabarzh gant e servijoù abalamour da renablîñ ar pezh a vez graet evit yezhoù Breizh dija hag ar mod ma c'hallfed gwellaat an traoù.

Diwar lakaat ar c'hinnigoù a-berzh ar gevelerien keñver-ha-keñver gant disoc'hoù an diagnostik diabarzh savet en ur zelc'hen kont eus ar micherioù, ar barregezhioù hag ar politikerezhioù departamant, ez eus kempennet ur gael evit heñchañ ar c'hendivizoù. E-kerzh an emvodoù ez eus deuet war wel e oa pouezus kendivizout, selaou ha lakaat alioù an

holl keñver-ha-keñver, anez ankouaat eo disheñvel stad ar gallaoueg diouzh hini ar brezhoneg koulz evit a sell ouzh ar c'helenn, ar bedagogiezh hag ar stummañ, hag ar plas er vuhez foran.

Meur a reuziad labour zo aet d'ober ar c'hendivizoù abalamour da dermeniñ, da gentañ, daou ahel labour pennañ, ahelioù ar brastres : treuzkas ha bevañ ar yezh. Goude-se eo bet lañset ar bodadoù labour teknikel, enne kevelerien ha renerezhioù ar strollegezh, war un toullad temoù pennañ a gaver er fichennoù oberoù kentañ a glot gant ar politike-rezhioù publik douget gant an Departamant hag a gloka anezhe.

**AHEL STRATEGEL N° 1 :
TREUZKAS AR YEZH**

KELENN HA STUMMAÑ KENTAÑ

AR STUMMAÑ DIBAOUEZ HAG AR STUMMAÑ EVIT AN
DUD VRAS

KENSKOAZELLOÙ

**AHEL STRATEGEL N° 2 :
BEVAÑ AR YEZH**LUSKAÑ SEVENADUREL ER BROIOÙ, MEMOR HA BUHEZ
AR C'HEVREDIGEZHIOÙ

KEHENTIÑ

Sichenn brastres yezh departamantel Aodoù-an-Arvor eo an ahelioù hag ar fichennoù oberoù-se. Savet eo bet ar fichennoù da-heul diwar ul labour evit mont pelloc'h gant ar pezh a vez graet dija ha war ar memes tro diwar ar c'hendivizoù a zo bet er bodadoù labour kentañ diwar-benn ar genskoazell hag ar c'hehentiñ (trimiziad 1^{añ} 2021).

Cheñch a ray ar brastres-mañ : ar programm oberoù da-heul eo ar stumm kentañ a vo resisaet, kresket ha kempennet bep ma vo dalc'het gant al labourioù. Gant ar c'hendivizoù omp krog gante abaoe fin 2019 hag a zleimp delc'hen gante, ez eus bet bodet obererien ensavadurel ha kevredigezhel hag o doa roet lañs da oberoù e kenlabour hag a vo dalc'het gante.

Ar gevelerien evit al labour-mañ :

- Ofis publik ar brezhoneg
- Ensavadur ar gallaoueg
- Rouedad Skolioù Diwan
- Div yezh Breizh
- Telenn
- Ti ar Vro Gwengamp
- Ti ar Vro Treger-Goueloù
- Raok brezhoneg
- Les Cllâssiers
- Qerouézée
- CAC Sud 22

UL LABOUR SIKOURET GANT UR BODAD EVEZHIAÑ HA PRIZIAÑ

Tonket eo ar brastres-mañ da cheñch, gant se e vo priziet efedoù hag efedusted an oberoù kaset da benn gant merkoù priziañ hag a zo lakaet er fichennoù oberoù.

Karget e vo ur bodad evezhiañ ha priziañ, ennañ kuzulierien-departamant, servijoù ar strollegezh ha kevelerien hag a genlabour ganimp evit ar brastres,

da sellet ingal ouzh stad an traoù. Bodet e vo evit en ober ur wech pe div wech ar bloaz. Dalc'het e vo kont eus an alioù hag an divizoù a vo graet evit divizout war ar brastres, ar pezh a zo diouzh spered ar c'hendiviz ac'h a d'ober sichenn an afer, hag adwelet ar programm oberoù evit kordañ gant ar poentoù pouezus a vo bet merket.

Fichennoù oberoù

1. TREUZKAS AR YEZH

An treuzkas eo an ahel emellout kentañ er brastres departamant evit yezhoù Breizh.

Evit gallout chom bev ha bleuñviñ eo ret d'ar yezhoù kaout kalz a gomzerien en holl rummaoù oad. N'eo ket trawalc'h avat stummañ komzerien yaouank evit suraat amzer-da-zont ar yezhoù. Dav eo ober war-dro an dalc'hoù a sell ouzh an treuzkas en ur mod hollek hag a laka an dud vras e-barzh ar jeu. Gant ur politikerezh evit sikour lakaat anavezout ar yezh e c'hall an Departamant lakaat kreskiñ niver ar gomzerien ; paneve ar c'hresk-se ec'h a ur yezh da get.

Teir lodenn ac'h a d'ober an ahel-se : ar c'helenn hag ar stummañ kentañ, ar stummañ dibaouez hag ar stummañ evit an dud vras, ar c'henskoazelloù a gemer an divyezhegezh abred (bugali-goù) hag al liamm etre ar remziadoù (tud war an oad) e kont.

1.1. KELENN HA STUMMAÑ KENTAÑ

Bodadoù labour a vo war an tem-mañ abalamour da dermeniñ an oberoù da vezañ lakaet da dalvezout evit kelenn ar brezhoneg hag ar gallaoueg. Savet e vo fichennoù oberoù war an tem-mañ bep ma 'c'h ay ar c'hendivizoù war-raok.



1.2. AR STUMMAÑ DIBAOUEZ HAG AR STUMMAÑ EVIT AN DUD VRAS

AHEL STRATEGEL	TREUZKAS AR YEZH
DAVEENN	1.2.1
TEM	AR STUMMAÑ DIBAOUEZ HAG AR STUMMAÑ EVIT AN DUD VRAS
OBER	LAKAAT AR C'HEVELEREZH A ZO KROG GANT KBMPT DA DALVEZOUT EVIT STUMMAÑ GWAZOURIEN AN DEPARTAMANT WAR AR BREZHONEG
KASER	REKO / RS (KENGASER)
PALIOÙ	- LAKAAT KRESKIÑ AN ANAOUDEGEZH EUS AR YEZHOU E-BARZH SERVIJOÙ AN DEPARTAMANT, EVIT DEGAS UR SERVIJ GWELLOC'H D'AN DUD - REIÑ AN TU DA WAZOURIEN AN DEPARTAMANT DA VEZAÑ STUMMET WAR AR BREZHONEG (204 EURVEZH EVIT PEP DALC'H, LIVEOÙ DERAOUIDI HA TUD VARREK)
EVIT PIV	GWAZOURIEN SERVIJ PUBLIK AN DEPARTAMANT
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	DIVIZADEG AR 6 A VIZ MEURZH 2017
KEVELERIEN	KBMPT – DILEURIADUR BREIZH
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	NIVER AR WAZOURIEN ENSKRIVET EVIT AR STUMMADUR

AHEL STRATEGEL	TREUZKAS AR YEZH
DAVEENN	1.2.2
TEM	AR STUMMAÑ DIBAOUEZ HAG AR STUMMAÑ EVIT AN DUD VRAS
OBER	- REIÑ 30€ DRE ZEN HAG A ZO O TESKIÑ D'AR C'HEVREDIGEZHIOÙ A RA WAR-DRO KENTELIOÙ-NOZ EVIT SIKOUR AR RE VRAS A ZESK BREZHONEG. - EMEUR O'N EM SOÑJAL EVIT CHEÑCH AR SIKOUR-MAÑ E 2022.
KASER	RS (SEVENADUR)
PALIOÙ	- KINNIG MODOÙ PEDAGOGEL NEVEZ EVIT SIKOUR AR C'HEVREDIGEZHIOÙ D'EN EM FRAMMAÑ HA SIKOUR AR RE A LABOUR EVIT STUMMAÑ KOMZERIEN YAOUANKOC'H. - SIKOUR AN DUD EN AODOÙ-AN-ÄRVOR DA ZESKIÑ BREZHONEG.
EVIT PIV	AR C'HEVREDIGEZHIOÙ EN AODOÙ-AN-ÄRVOR A LABOUR EVIT DESKIÑ BREZHONEG D'AN DUD
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	BEZAÑ EZ EUS EUS AR STIGNAD-MAÑ DIJA
SIKOUR ARC'HANT AN DEPARTAMANT	15 120 € (2020) EVIT SIKOUR AR C'HEVREDIGEZHIOÙ A LABOUR EVIT DESKIÑ BREZHONEG D'AN DUD
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	AN NIVER A GOMZERIEN, A GENTELIOÙ, A STAJOU, NIVER AR GELENNERIEN GOPRET, NIVER AR C'HEVREDIGEZHIOÙ A RA GANT AR MODOÙ PEDAGOGEL NEVEZ

1.3. KENSKOAZELLOÙ

AHEL STRATEGEL	TREUZKAS AR YEZH
DAVEENN	1.3.1
TEM	KENSKOAZELLOÙ / BUGALIGOÙ
OBER	BRUDAÑ AN DIVYEZHEGEZH E KARNEDOÙ YEC'HED AR GMB : - LAKAAT UN TAMM PENNAD GALLEK DA GENTAÑ - TREIÑ AN TITLOÙ HAG AN ISTITLOÙ E BREZHONEG HAG E GALLAOUEG GOUDE-SE
KASER	RBF (GMB) / RS (KENGASER) / TAD (RENEREZHIOÙ KEVELET)
PALIOÙ	SACHAÑ EVEZH AN DUD WAR EFEDOÙ MAT AN DIVYEZHEGEZH EVIT LAKAAT AR VUGALE DA ZIHUNIÑ O SKIANTOÙ ANAOUT - LAKAAT AN DUD A LABOUR ER GMB E-BARZH AR JEU - AESAAT AL LIAMMOÙ GANT AR SKOLIATA EN HENTADOÙ DIVYEZHEK
EVIT PIV	FAMILHOÙ GANTE BABIGOÙ NEVEZ-GANET PE BUGALE YAOUANK
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	EIL C'HWEC'HMIZIAD 2021 (DA-GEÑVER ADEMBANNADUR AR C'HARNED)
KEVELERIEI	- OFIS PUBLIK AR BREZHONEG - ENSAVADUR AR GALLAOUEG
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	- NIVER AR C'HARNEDOÙ YEC'HED MOULLET HA SKIGNET - NIVER AN DUD A VICHER ER GMB DEDENNET GANT DALC'HOÙ AN DIVYEZHEGEZH - RENTAOU-KONT GANT AR GEVELERIEI HAG AR C'HEVREDIGEZHIOÙ DIWAR- BENN EFED AR STIGNAD

AHEL STRATEGEL	TREUZKAS AR YEZH
DAVEENN	1.3.2
TEM	KENSKOAZELLOÙ / BUGALIGOÙ
OBER	SEVEL UR BLAKETENN GELAOUIN WAR AN DIVYEZHEGEZH ABRED
KASER	RBF (GMB) / RS (KENGASER) / RENKEH (RENEREZH KEVELET)
PALIOÙ	- KELAOUIN HA SACHAÑ EVEZH TUD AR VUGALE HAG AN DUD A LABOUR WAR DACHENN AR VUGALIGOÙ WAR EFEDOÙ MAT AN DIVYEZHEGEZH EVIT LAKAAT AR VUGALE DA ZIHUNIÑ O SKIANTOÙ ANAOUT - AESAAT AL LIAMMOÙ GANT AR SKOLIATA EN HENTADOÙ DIVYEZHEK
EVIT PIV	FAMILHOÙ, TUD A VICHER HAG AL LEC'HIOÙ MA VEZ DEGEMERET BUGALIGOÙ
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	2022
KEVELERIEI	- AN HOLL OBERERIEI EN DEPARTAMANT A RA WAR-DRO REIN LAÑS HA DESKIN BREZHONEG HA GALLAOUEG D'AN DUD - AR FRAMMOÙ A VER AL LEC'HIOÙ MA VEZ DEGEMERET BUGALE YAOUANK
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	- NIVER AR SKOUERENNOÙ MOULLET HA SKIGNET - NIVER AR SKIGNADURIOÙ EUS AR BLAKETENN - EMBANN AR BLAKETENN ENLINENN - NIVER AR MAREOÙ KEJAÑ GANT AN DUD HAG AR FRAMMOÙ A LABOUR WAR DACHENN AR VUGALIGOÙ

AHEL STRATEGEL	TREUZKAS AR YEZH
DAVEENN	1.3.3
TEM	KENSKOAZELLOÙ / TUD WAR AN OAD
OBER	KEMER AR YEZHOU RANNVRO E KONT EN OBEROÙ DIZARBENN HARPET GANT KUZULIADEG AN ARC'HANTERIEH EVIT AN DUD WAR AN OAD N'INT KET EMREN KEN
KASER	KUZULIADEG AN ARC'HANTERIEH (DEPARTAMANT, KEFIOÙ LEVE, ARY)
PALIOÙ	- SIKOUR AN OBEROÙ DIZARBENN EN AHDOD PE ER GÊR E YEZH-VAMM AN DUD - AESAAT D'AN DUD KOMZ BREZHONEG PE GALLAOUEG ABALAMOUR DA GAOUT ISTIM EVITE O-UNAN - MUZULIAÑ EFED AR STOKADENN BEVET GANT AN DUD ABALAMOUR MA VEZE DIFENNET OUTE A GOMZ O YEZH-VAMM PA OANT BIHAN HA NEUZE KINNIG DIZARBENNOÙ A-RATOZH
EVIT PIV	TUD WAR AN OAD ER GÊR PE EN TIEZ-DEGEMER
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	GALV DA RAKTRESOÙ KUZULIADEG AN ARC'HANTERIEH 2022
KEVELERIEH	SERVIJOÙ E TI AN DUD, AHDOD, POURCHASERIEH DIZARBENN
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	EFED AN OBEROÙ WAR AN DUD EVIT A SELL OUZH BEZAÑ EN O BLEUD, AN DIZARBENN E-KEÑVER AR YEC'HED, EN EM ISTIMAÑ O-UNAN

Fichennoù oberoù

2. BEVAÑ AR YEZH

An implij sokial hag an endro yezhel ac’h a d’ober an eil ahel emellout e brastres an departamant evit yezhoù Breizh. Broudañ da lakaat implij ar brezhoneg hag ar gallaoueg war wel a zeu da-heul an oberoù lañset evit aesaat an treuzkas.

Bevañ a ra ur yezh gant ma vez lakaet war wel er vuhez foran, gant se e ranker broudañ ar muiañ ma c’haller an digarezioù da welet, da gomz ha da glevet anezhi er vuhez pemdez. Lakaat ur yezh da vezañ gwelet, klevet ha komzet muioc’h zo ivez ur mod da lakaat identelezh an departamant war wel, ar pezh a zo mat evit e vrud hag evit sachañ tud etrezek ennañ.

Div lodenn ac’h a d’ober an ahel-mañ : al luskañ sevenadurel er broioù, ar memor ha buhez ar c’hevredigezhioù eus un tu, hag ar pezh a sell ouzh kehentiñ eus an tu all.



2.1. LUSKAÑ SEVENADUREL ER BROIOÙ, MEMOR HA BUHEZ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ

AHEL STRATEGEL	BEVAÑ AR YEZH
DAVEENN	2.1.1
TEM	LUSKAÑ SEVENADUREL ER BROIOÙ, MEMOR HA BUHEZ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ
OBER	LAKAAT AR MAMMENNOÙ ISTOREL E BREZHONEG HAG E GALLAOUEG WAR WEL
KASER	RS (DIELLOÙ DEPARTAMANT)
PALIOÙ	DIGERIÑ D'AN DUD AN DIELLOÙ MIRET E DIELLOÙ DEPARTAMANT AODOÙ-AN-ARVOR HA GANT O C'HEVELERIEI : - RENABL AR MAMMENNOÙ MIRET GANT DIELLOÙ DEPARTAMANT AODOÙ-AN-ARVOR, LAKAAT DIELLOÙ ZO ENLINENN (KAZETENNOÙ DREIST-HOLL) - KEMER PERZH EN DASTUM TEULIOÙ BREZHONEK A VEZ GRAET GANT KREIZENN AN ENKLASKOÙ BREIZHEK HA Keltiek (KEBK) - UN NOR NIVEREL EVIT KAVOUT DANVEZIOÙ HOR C'HEVELERIEI (DASTUM, GWAREZ FILMOÙ BREIZH) - BRUDAÑ AR MAMMENNOÙ ER SKOLIOÙ (AOZAÑ UN ABADENN BEDAGOGEL) - DEGEMER PREZEGENNOÙ WAR AN DANVEZ-MAÑ
EVIT PIV	AN DUD A ZAREMPRED AN DIELLOÙ DEPARTAMANT (SKOLVEURIDI, STUDIERIEN, KLASKERIEI, GOUIZIEIEN), SKOLIOÙ
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	2021-2022
KEVELERIEI	DASTUM, GWAREZ FILMOÙ BREIZH, KEBK, SKOLIOÙ
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	- PET GWECH EZ EUS BET TUD O SELLET OUZH DIELLOÙ - PET GWECH EZ EUS BET TUD O SELLET OUZH DIELLOÙ NIVERELAET - NIVER AR SKOLIDI O DEUS KEMERET PERZH EN ABADENN BEDAGOGEL

AHEL STRATEGEL	BEVAÑ AR YEZH
DAVEENN	2.1.2
TEM	LUSKAÑ SEVENADUREL ER BROIOÙ, MEMOR HA BUHEZ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ
OBER	BRUDAÑ SKOURR AR BREZHONEG E KAWAN
KASER	RS (LEVRAOUEG AODOÙ-AN-ARVOR)
PALIOÙ	- BRUDAÑ AN DASTUMAD DIELLOÙ BRETON LEC'HEL EVIT AN DEPARTAMANT - REIÑ LAÑS D'UR C'HINNIG HANterouriezh SEVENADUREL HA NIVEREL DIWAR-BENN AR BREZHONEG - SACHAÑ AN DUD, PE E VEFENT KUSTUM DA ZAREMPREDIÑ LEC'HIOÙ SEURT-SE PE GET, WAR-ZU SKOURR AR BREZHONEG E KAWAN - KREÑVAAT AR C'HENLABOUR GANT AN OBERERIEH WAR AN TACHENNOÙ SEVENADUREL, SOKIAL, AR SPORT AR C'HEVREDIGEZHIOÙ HAG AN DESKADUREZH EVIT LAKAAT AR BREZHONEG WAR WEL
EVIT PIV	DILENNIDI, GWAZOURIEH, OBERERIEH SEVENADUREL, WAR DACHENN AL LENN HAG AL LEVRIOÙ, AN DUD A GUSTUM DAREMPREDIÑ AL LEC'HIOÙ, SEURT-SE E DEPARTAMANT AODOÙ-AN-ARVOR
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	2022-2027
KEVELERIEH	TI AR VRO TREGER-GOUELOÙ
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	- STANKTED AN AMPRESTOÙ EVIT AN DASTUMAD BRETON LEC'HEL - NIVER AN OBEROÙ HANterouriezh SEVENADUREL HA NIVEREL DIWAR-BENN AR BREZHONEG - NIVER AN DUD ENSKRIVET E SKOURR AR BREZHONEG E KAWAN - NIVER AR C'HENLABOURIOÙ GANT AN OBERERIEH WAR AN TACHENNOÙ SEVENADUREL, SOKIAL, AR SPORT AR C'HEVREDIGEZHIOÙ HAG AN DESKADUREZH EVIT LAKAAT AR BREZHONEG WAR WEL

AHEL STRATEGEL	BEVAÑ AR YEZH
DAVEENN	2.1.3
TEM	LUSKAÑ SEVENADUREL ER BROIOÙ, MEMOR HA BUHEZ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ
OBER	HARPAÑ AN OBEROÙ KEMPENN, LUSKAÑ, HANterouriezh PE SKIGNAÑ SEVENADUREL E BREZHONEG HAG E GALLAOUER GANT AR C'HEVREDIGEZHIOÙ KEVELET
KASER	RS (SEVENADUR)
PALIOÙ	KREÑVAAT UR POLITIKEREZH SEVENADUREL PE ARZEL HAG A SIKOUR YEZHIOÙ BREIZH EN UN TAKAD
EVIT PIV	KEVREDIGEZHIOÙ DIORREN SEVENADUREL HA HANterouriezh HAG A LABOUR EVIT AN DIVYEZHEGEZH, AN DUD A ZO O CHOM EN AODOÙ-AN-ARVOR
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	BEZAÑ EZ EUS EUS AR STIGNAD-MAÑ DIJA
KEVELERIEH	RRAS, RANNVRO, KUMUNIOÙ, DPKE, KEVREDIGEZHIOÙ, AR GEVREDIGEZH KEODEDEL
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
SIKOUR ARC'HANT AN DEPARTAMANT	267 500 € (2021) EVIT SIKOUR AR C'HEVREDIGEZHIOÙ A LABOUR EVIT DIORREN AN TAKAD
MERKOÙ	AR VRUD ER VRO, REIZHDED HA LIESSEURTED AN OBEROÙ HANterouriezh PE SKIGNAÑ, SIKOUR AR GUMUN PE AN ETRKUMUNIEZH, OBEROÙ HANterouriezh WAR-ZU TUD RESIS

AHEL STRATEGEL	BEVAÑ AR YEZH
DAVEENN	2.1.4
TEM	LUSKAÑ SEVENADUREL ER BROIOÙ, MEMOR HA BUHEZ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ
OBER	SIKOUR, A-FET MONT EN-DRO HAG IJINOURIEZH, AR MEDIAOÙ (RADIOIOÙ, WEB TV) A SKIGN PROGRAMMOÙ E BREZHONEG PE E GALLAOUEG HA KRESKIÑ NIVER AR MEDIAOÙ, NIVER AR SELAOUERIEH HAG AR SELLERIEH, NIVER AR PROGRAMMOÙ
KASER	RS (SEVENADUR)
PALIOÙ	LEDANAAT AR C'HINNIG E BREZHONEG HAG E GALLAOUEG WAR DACHENN AR C'HLEWELED EVIT BROUDAÑ AN DIVYEZHEGEZH
EVIT PIV	AR RADIOIOÙ KEVREDIGEZH A SKIGN ABADENNOÙ E BREZHONEG PE E GALLAOUEG, AR SELAOUEREZED HAG AR SELAOUERIEH
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	BEZAÑ EZ EUS EUS AR STIGNAD-MAÑ DIJA
KEVELERIEH	STAD, CSA, DPKE, STROLLEGEZHIOÙ LEC'HEL DIOUZH AN OBEROÙ
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
SIKOUR ARC'HANT AN DEPARTAMANT	64 500 € (2021) EVIT HARPAÑ AR MEDIAOÙ
MERKOÙ	AOTREOÙ DA SKIGNAÑ GANT AR CSA, KAEI AR PROGRAMMOÙ / STANKTER AR SKIGNADENNOÙ, KALITE AR PROGRAMMOÙ, AN TACHENNOÙ SKIGNAÑ, AN DREGANTAD A SELAOUERIEH HAG A SELLERIEH, BILAÑS AR BLOAZ

AHEL STRATEGEL	BEVAÑ AR YEZH
DAVEENN	2.1.5
TEM	LUSKAÑ SEVENADUREL ER BROIOÙ, MEMOR HA BUHEZ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ
OBER	HARPAÑ TI AR C'HOADOÙ ER CHAPEL-NEVEZ
KASER	RG (GLAD NATUREL) / RS (KENRENEREZH)
PALIOÙ	LAKAAT AR GLAD, SEVENADUR BREIZH HAG AR BREZHONEG WAR WEL. BROUDAÑ AN OBEROÙ E BREZHONEG (GRAET E VEZ OBEROÙ E GALLEG KOULZ HAG E BREZHONEG) : - KLASOÙ ANAVEZOUT AN NATUR (KOADOÙ, GIRZHIER, GLAD, SEVENADUR BREIZH, DIORREN PADUS) EVIT AR RE YAOUANK EUS AR SKOL-VAMM BETEK AL LISE. - CHOMADENNOÙ VAKAÑSIÑ EVIT BUGALE HA KRENNARDED EVIT ANAVEZOUT AN NATUR EN UR C'HOARI. - « TROIADOÙ NATUR » DIGOR D'AN HOLL A-HED AR BLOAZ, EVIT ANAVEZOUT AL LOENED HAG AR PLANT GOUEZ. - STAJOÙ DIGOR D'AN HOLL EVIT DESKIÑ AN TEKNIKOÙ EVIT KEMPENN AR GIRZHIER, UL LIORZH EKOLOGEL... - STUMMADURIOÙ WAR AN NATUR HAG AL LUSKAÑ EVIT AR STUDIERIEN PE AN DUD A VICHER. - ABADENNOÙ ER SKOLIOÙ PE DA-GEÑVER DEGOUEZHIOÙ ZO ER VRO (SALOÑSOÙ, FESTOÙ) - OBEROÙ A BEP SEURT : GWENODENNOÙ-BALE, DISKOUZADEGOÙ, BINVIOÙ PEDAGOGEL.
EVIT PIV	AR SKOLIOÙ E CHOMADENNOÙ PE EN ABADENNOÙ WAR UN DEVEZH, AN HOLL DUD DA-GEÑVER AR GWELADENNOÙ HEÑCHET, AN DIDUAMANTOÙ, AR FESTOÙ, AN DUD E STUMMADURIOÙ
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	BEZAÑ EZ EUS EUS AR STIGNAD-MAÑ DIJA
KEVELERIEN	UNVANIEZH BREIZH BUHEZIÑ AR BROIOÙ DIWAR AR MAEZ (UBAPAR), ROUEDAD DESKIÑ DIOUZH AN ENDRO E BREIZH (REEB), STROLLEGEZHIOÙ, OFIS AN TOURISTEREZH
SIKOUR ARC'HANT AN DEPARTAMANT	- UR SIKOUR 35 000 € EVIT AR MONT EN-DRO DA-GEÑVER POLITIKEREZH AN DEPARTAMANT EVIT AN NATUR - SKODENN IMPLIJ KEVREDIGEZH DEPARTAMANTEL 15 000 € EVIT POST AR RENER E TI AR C'HOADOÙ
MERKOÙ	- NIVER AN DEVEZHIOÙ BUHEZIÑ E BREZHONEG (EVIT AR SKOLIOÙ, AN HOLL DUD, AN DUD VRAS ER STUMMADURIOÙ). - NIVER AN DUD O DEUS KEMERET PERZH EN DIDUAMANTOÙ E BREZHONEG - SEVEL BINVIOÙ PEDAGOGEL MA LAKAER AR BREZHONEG WAR WEL.

2.2. KEHENTIÑ

AHEL STRATEGEL	BEVAÑ AR YEZH
DAVEENN	2.2.1
TEM	KEHENTIÑ
OBER	TERMENIÑ UR PROTOKOL EVIT BRUDAÑ HA BROUDAÑ AR PANELLEREZH DIVYEZEK PE TEIRYEZEK EN DIAVAEZ PE E DIABARZH SAVADURIOÙ HA LEC'HENNOÙ AN DEPARTAMANT
KASER	RS / RG, RENKEH (KENSTURIER)
PALIOÙ	- KEMPENN UR VETOLOGIEZH BOUTIN D'AN HOLL OBERERIE - EEUNAAT HAG HOLLEKAAT AN DIFRAEOÙ HAG AR REOLENNOÙ - UNVANIÑ AR MODOÙ D'OBER
EVIT PIV	AR SERVIJOÙ EN DEPARTAMANT A SELL AR PANELLEREZH OUTE
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	EIL C'HWEC'HMIZIAD 2021 – 1 ^{AN} C'HWEC'HMIZIAD 2022
KEVELERIE	- OFIS PUBLIK AR BREZHONEG - ENSAVADUR AR GALLAOUEG
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	APROUIÑ UR PROTOKOL HA LAKAAT ANEZHAÑ DA DALVEZOUT

AHEL STRATEGEL	BEVAÑ AR YEZH
DAVEENN	2.2.2
TEM	KEHENTIÑ
OBER	TERMENIÑ UR PROTOKOL HAG A GEMER AR YEZHOU RANNVRO E KONT EVIT AN DAREMPREDOÙ GANT AN DUD (KEMENNADENN DEGEMER ER PELLGOMZ, TALBENN AL LIZHEROÙ, SINADUR AR POSTELOÙ HA KEMENT ZO)
KASER	PRS / RRS, RENKEH (RENEREZHIOÙ KEVELET)
PALIOÙ	- KEMPENN UR VETOLOGIEZH BOUTIN D'AN HOLL OBERERIE - EEUNAAT HAG HOLLEKAAT AN DIFRAEOÙ HAG AR REOLENNOÙ - UNVANIÑ AR MODOÙ D'OBER
EVIT PIV	AR SERVIJOÙ EN DEPARTAMANT A SELL KEMENT-SE OUTE
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	EIL C'HWEC'HMIZIAD 2021 – 1 ^{AN} C'HWEC'HMIZIAD 2022
KEVELERIE	- OFIS PUBLIK AR BREZHONEG - ENSAVADUR AR GALLAOUEG
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	APROUIÑ UR PROTOKOL HA LAKAAT ANEZHAÑ DA DALVEZOUT

AHEL STRATEGEL	BEVAÑ AR YEZH
DAVEENN	2.2.3
TEM	KEHENTIÑ
OBER	KROUIÑ UR RUBRIKENN A-RATOZH EVIT LAKAAT POLITIKEREZH AN DEPARTAMANT EVIT YEZHOU BREIZH WAR WEL EL LEC'HIENN WWW.COTESDARMOR.FR
KASER	RENKEH / RS (RENEREZH KEVELET)
PALIOÙ	- KINNIG BRASTRES YEZH DEPARTAMANT AODOÛ-AN-ARVOR EVIT YEZHOU BREIZH - LAKAAT POLITIKEREZH AN DEPARTAMANT EVIT YEZHOU BREIZH WAR WEL
EVIT PIV	AN DUD A IMPLIJ SERVIJ PUBLIK AN DEPARTAMANT AN HOLL DUD AC'H A DA SELLET OUZH LEC'HENN INTERNET AN DEPARTAMANT
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	EIL C'HWEC'HMIZIAD 2021
KEVELERIE	AN DANVEZ KEMENNADENNERIE
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	- NIVER AN DUD A SELLO OUZH AR RUBRIKENN - SELLET OUZH AR GOULENNOÙ TITOUROÙ A-BERZH AN IMPLIJERIE DIWAR-BENN AR POLITIKEREZH-MAÑ - EMBANN TITOUROÙ WAR POLITIKEREZH AN DEPARTAMANT EVIT YEZHOU BREIZH

AHEL STRATEGEL	BEVAÑ AR YEZH
DAVEENN	2.2.4
TEM	KEHENTIÑ
OBER	BRUDAÑ YEZHOU BREIZH E KEHENTIÑ AN DEPARTAMANT (PROFILOÙ AR ROUEDADOÙ SOKIAL, LEC'HIENN INTERNET, KAZETENN DAOUVIZIEK HA KEMENT ZO)
KASER	RENKEH / RS (RENEREZH KEVELET)
PALIOÙ	LAKAAT AR BREZHONEG HAG AR GALLAOUEG MUIOC'H WAR WEL E KAZETENN AN DEPARTAMANT HA BROUDAÑ D'OBER GANT AN DIV YEZH PAR-OUZH-PAR
EVIT PIV	AN DUD A IMPLIJ SERVIJ PUBLIK AN DEPARTAMANT
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	UN OBER KASET DA BENN DIJA DA VEZAÑ KASET PELLOC'H AVAT
KEVELERIE	- OFIS PUBLIK AR BREZHONEG - ENSAVADUR AR GALLAOUEG
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	NIVER AR PENNADOÙ SAVET ER MOD-SE

AHEL STRATEGEL	BEVAÑ AR YEZH
DAVEENN	2.2.5
TEM	KEHENTIÑ
OBER	BRUDAÑ YEZHOU BREIZH GANT OSTILHOÙ KEHENTIÑ AN DEPARTAMANT
KASER	RENKEH / RS (RENEREZH KEVELET)
PALIOÙ	- BRUDAÑ AR C'HOULZADOÙ KEHENTIÑ HAG AN OBEROÙ EVIT AR YEZHOU RANNVRO (EVEL MIZVEZH AR BREZHONEG, MIZVEZH AR GALLAOUEG, AR GELENNADUREZH DIVYEZEK, AR C'HENTELIOÙ-NOZ HA KEMENT ZO) - AESAAT SKIGNAÑ AN TITOUROÙ E-MESK AN DUD EN AODOÙ-AN-ARVOR
EVIT PIV	AN DUD A IMPLIJ SERVIJ PUBLIK AN DEPARTAMANT
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	UN OBER KASET DA BENN DIJA DA VEZAÑ KASET PELLOC'H AVAT
KEVELERIEEN	AN HOLL GEVELERIEEN EN DEPARTAMANT A LABOUR EVIT TREUZKAS HA REIÑ LAÑS D'AR BREZHONEG HA D'AR GALLAOUEG
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	NIVER AR C'HEVELEREZHIOÙ, NIVER AR C'HOULZADOÙ, NIVER AR C'HOULZADOÙ ER GWASKEDOÙ-BUS

AHEL STRATEGEL	BEVAÑ AR YEZH
DAVEENN	2.2.6
TEM	KEHENTIÑ
OBER	SKIGNAÑ UR C'HOULENNAOUEG DIABARZH E SERVIJOÙ AN DEPARTAMANT WAR YEZHOU BREIZH
KASER	RS / REKO, KEHENTIÑ DIABARZH (RENEREZH HA SERVIJOÙ LIAMMET)
PALIOÙ	- ANAVEZOUT HA PRIZIAÑ PEGEN DEDENNET EO AR WAZOURIEN WAR-ZU AR BREZHONEG HAG AR GALLAOUEG - RENABLIÑ AR BARREGEZHIOÙ A ZO EN O MESK DIJA WAR DACHENN AR YEZHOU
EVIT PIV	GWAZOURIEN AR C'HUZUL-DEPARTAMANT, AR SKOAZELLERIEEN DIEGEZHEL HAG ALL
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	1 ^{añ} C'HWEC'HMIZIAD 2021
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	- NIVER AR RESPONTOÙ - DIELFENNAÑ HA RENTAÑ-KONT AN ENKLASK

AHEL STRATEGEL	BEVAÑ AR YEZH
DAVEENN	2.2.7
TEM	KEHENTIÑ
OBER	AOZAÑ MAREOÙ TITOURIÑ HA DESKADUREZH HOLLEK WAR YEZHOÙ BREIZH E DIABARZH SERVIJOÙ AN DEPARTAMANT
KASER	RS / KEHENTIÑ DIABARZH (SERVIJ LIAMMET)
PALIOÙ	- KOMPREN AR PEZH A ZO E DALC'H EVIT A SELL OUZH SAVETIÑ HA TREUZKAS YEZHOÙ BREIZH - BROUDAÑ AN DALC'HOÙ A SELL OUZH AR DESKADUREZH HOLLEK
EVIT PIV	GWAZOURIEN HA DILENNIDI AR C'HUZUL-DEPARTAMANT
DEIZIATAER AL LABOURIOÙ	2022
KEVELERIE	KEVELERIE, ARBENNIGOURIEN, SKOLVEURIDI HA KEMENT ZO
TAKAD	AN DEPARTAMANT A-BEZH
MERKOÙ	- AOZAÑ PREZEGENNOÙ WAR AN DESKADUREZH HOLLEK EVIT GWAZOURIEN AN DEPARTAMANT - NIVER AN DUD A GEMERO PERZH - LAKAAT AN OBER-MAÑ WAR ROLL-LABOUR AR BODAD KEODEDOURIEZH

RENABL AR FICHENNOÙ OBEROÙ

DAVEENN	AHEL STRATEGEL	TEM	TALBENN
1.2.1	TREUZKAS AR YEZH	STUMMAÑ DIBAOUEZ HAG EVIT AN DUD VRAS	LUSKAÑ AR C'HEVELEREZH GANT KBMPT EVIT STUMMAÑ GWAZOURIEN AN DEPARTAMANT WAR AR BREZHONEG
1.2.2	TREUZKAS AR YEZH	STUMMAÑ DIBAOUEZ HAG EVIT AN DUD VRAS	REIÑ 30€ DRE ZEN HAG A ZO O TESKIÑ D'AR C'HEVREDIGEZHIOÙ A RA WAR-DRO KENTELIOÙ-NOZ EVIT SIKOUR AR RE VRAS A GOMZ GALLAOUEG PE BREZHONEG
1.3.1	TREUZKAS AR YEZH	KENSKOAZELLOÙ / BUGALIGOÙ	BRUDAÑ AN DIVYEZHEGEZH E KARNEDOÙ YEC'HED AR GMB
1.3.2	TREUZKAS AR YEZH	KENSKOAZELLOÙ / BUGALIGOÙ	SEVEL UR BLAKETENN DITOURIÑ DIWAR-BENN AN DIVYEZHEGEZH ABRED
1.3.3	TREUZKAS AR YEZH	KENSKOAZELLOÙ / TUD WAR AN OAD	KEMER AR YEZHOU RANNNVRO E KONT EN OBEROÙ DIZARBENN SIKOURET GANT KUZULIADEG AN ARC'HANTERIEN EVIT AN DUD WAR AN OAD N'INT KET EMREN KEN
2.1.1	BEVAÑ AR YEZH	LUSKAÑ SEVENADUREL ER BROIOÙ, MEMOR HA BUHEZ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ	LAKAAT AR MAMMENNOÙ ISTOREL E BREZHONEG HAG E GALLAOUEG WAR WEL
2.1.2	BEVAÑ AR YEZH	LUSKAÑ SEVENADUREL ER BROIOÙ, MEMOR HA BUHEZ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ	BRUDAÑ SKOURR AR BREZHONEG E KAWAN
2.1.3	BEVAÑ AR YEZH	LUSKAÑ SEVENADUREL ER BROIOÙ, MEMOR HA BUHEZ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ	HARPAÑ AN OBEROÙ KEMPENN, LUSKAÑ, HANTOURIEZH PE SKIGNAÑ SEVENADUREL E BREZHONEG HAG E GALLAOUEG GANT AR C'HEVREDIGEZHIOÙ KEVELET
2.1.4	BEVAÑ AR YEZH	LUSKAÑ SEVENADUREL ER BROIOÙ, MEMOR HA BUHEZ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ	SIKOUR, A-FET MONT EN-DRO HAG IJINOURIEZH, AR MEDIAOÙ (RADIOIOÙ, WEB TV) A SKIGN PROGRAMMOÙ E BREZHONEG PE E GALLAOUEG HA KRESKIÑ NIVER AR MEDIAOÙ, NIVER AR SELAOUERIEN HAG AR SELLERIEN, NIVER AR PROGRAMMOÙ
2.1.5	BEVAÑ AR YEZH	LUSKAÑ SEVENADUREL ER BROIOÙ, MEMOR HA BUHEZ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ	HARPAÑ TI AR C'HOADOÙ ER CHAPEL-NEVEZ
2.2.1	BEVAÑ AR YEZH	KEHENTIÑ / PANELLEREZH	TERMENIÑ UR PROTOKOL EVIT BRUDAÑ HA BROUDAÑ AR PANELLEREZH DIVYEZHKEH PE TEIRYEZHKEH EN DIAVAEZ PE E DIABARZH SAVADURIOÙ HA LEC'HIENNOÙ AN DEPARTAMANT
2.2.2	BEVAÑ AR YEZH	KEHENTIÑ / DAREMPREDOÙ GANT AN IMPLIJERIEN	TERMENIÑ UR PROTOKOL HAG A GEMER AR YEZHOU RANNVRO E KONT EVIT AN DAREMPREDOÙ GANT AN DUD (KEMENNADENN DEGEMER ER PELLGOMZ, TALBENN AL LIZHEROÙ, SINADUR AR POSTELOÙ HA KEMENT ZO)
2.2.3	BEVAÑ AR YEZH	KEHENTIÑ	KROUIÑ UR RUBRIKENN A-RATOZH EVIT LAKAAT POLITIKEREZH AN DEPARTAMANT EVIT YEZHOU BREIZH WAR WEL EL LEC'HIENN WWW.COTESDARMOR.FR
2.2.4	BEVAÑ AR YEZH	KEHENTIÑ	BRUDAÑ YEZHOU BREIZH GANT OSTILHOÙ KEHENTIÑ AN DEPARTAMANT
2.2.5	BEVAÑ AR YEZH	KEHENTIÑ	BRUDAÑ AN OBEROÙ A LAKA YEZHOU BREIZH WAR WEL GANT OSTILHOÙ KEHENTIÑ AN DEPARTAMANT
2.2.6	BEVAÑ AR YEZH	KEHENTIÑ / KEHENTIÑ DIABARZH	SKIGNAÑ UR C'HOULENNAOUEG DIABARZH E SERVIJOÙ AN DEPARTAMANT WAR YEZHOU BREIZH
2.2.7	BEVAÑ AR YEZH	KEHENTIÑ / KEHENTIÑ DIABARZH	AOZAÑ MAREOÙ TITOURIÑ HA DESKADUREZH HOLLEK WAR YEZHOU BREIZH E DIABARZH SERVIJOÙ AN DEPARTAMANT

NOTENNOÙ



Departamant Aodoù-an-Arvor
Renerezh ar Sevenadur hag ar Glad Sevenadurel
9 plasenn ar Jeneral de Gaulle CS 42371
22023 SANT-BRIEG Cedex 1



cotesdarmor.fr



Aodoù-an-Arvor
an Departamant

